

KATEKIZ

ESKOPTI

KEMPER HA LEON



KEMPER

MOULLET E TI ARSÈNE DE KERANDAL

Mouller ann Eskopti.

*C. G. G. G. G.
francés*

Diocèse de
Quimper & Léon
— Eskopti Kemper ha Leon —

Document numérisé en 2016

KATEKIZ

ESKOPTI KEMPER HA LEON

FRANCES-VIRJIL DUBILLARD, Eskop Kemper ha Leon,

Rei a reomp kounje d'ann Aotrou A. DE KERANGAL, mouller ann Eskopti, da voulla *Katekiz brezounek Eskopti Kemper ha Leon.*

Roet e Kemper, gant Hor sinatur, siell Hon armou ha sinatur Hor Sekretour, ann 19 a viz Genver 1901.



† FRANCES-VIRJIL,
Eskop Kemper ha Leon.

Dre urz ann Aotrou'nn Eskop :

F. VIEILLE-CESSAY,
Chaloni a henor,
Sekretour ann Eskopti.

1474

BIBLIOTHEQUE
QUIMPER
DIOCESAINE

KATEKIZ

ESKOPTI KEMPER HA LEON

KENTEL GENTA

DIVAR BENN
ANN HANO A GRISTEN, HA MERK AR C'HRISTEN

GOULENN. *Ha c'houi zo Kristen ?*

RESPOUNT. Ia, dre c'hras Doue.

G. *Petra eo eur C'hristen mad ?*

R. Eur C'hristen mad a zo eunn den badezet a gred hag a heul al lezenn gristen.

G. *Petra eo al lezenn gristen ?*

R. Al lezenn gristen eo ann hini a zo bet deñket d'eomp gant Jezuz-Krist he-unan p'edo o veva var ann douar, hag a zesk d'eomp brema euz he berz ann Iliz santel katholik, abostolik ha romen.

G. *Petra zesk d'eomp al lezenn gristen ?*

R. Al lezenn gristen a zesk d'eomp tri seurt traou : traou da gredi, traou da ober ha traou d'hor zikour d'en em zantifia.

G. *Ha red eo gouzout al lezenn gristen ?*

R. Ia, hag ar re ne fell ket d'ezho he deski ne c'hellont ket beza salvet.

G. *Ann tadou hag ar mammou hag hi a dle deski al lezenn gristen d'ho bugale ?*

R. Ia, hen ober a dleont, ha pec'hed bras o deuz mar mankont d'ann dever-ze.

G. *Pehini eo merk ar C'hristen ?*

R. Sin ar Groaz eo.

G. *Perak eo sin ar Groaz merk ar C'hristen ?*

R. Abalamour ar C'hristen a ziskouez dre zin ar Groaz eo diskib da Jezuz-Krist maro var ar Groaz.

G. *Penaoz e reer sin ar Groaz ?*

R. Ober a reer sin ar Groaz o kas ann dorn deou d'ann tal, ac'hano d'ar stomok, goudeze d'ar skoaz gleiz hag ac'hano d'ann hini zeou, en eur lavaret e brezounek : *Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel. Evelse bezet great ; pe e latin : In nomine Patris, et Filii, et Spiritus Sancti. Amen.*

G. *Pe seurt vertuz en deuz sin ar Groaz ?*

R. Pa vez great gant feiz ha gant respet, sin ar Groaz en deuz ar vertuz da gas ann drouk-spered divar hon tro ; da rei nerz a enep ann tentasionou, ha da denna bennoz Doue varnomp ha var ar pezh a reomp.

G. *Peur eo mad ober sin ar Groaz ?*

R. Mad eo ober sin ar Groaz dioc'h ar mintin pa zaver, dioc'h ann noz pa'z eer da gousket, araok ar pedennou hag ar peb brasa euz ann oberiou, pa vezer tentet pe e riskl da gaout eunn drouk bennag.

KENTA LODENN

DIVAR BENN

AR GUIRIONEZIOU A RANKOMP DA GREDI

EIL GENTEL

AR *Gredo.*

G. *E pe leac'h eo merket ar guirioneziou a rankomp da gredi ?*

R. Ar peb brasa euz ar guirioneziou-ze a zo merket er *Gredo.*

G. *Petra eo ar Gredo ?*

R. Ar *Gredo* a zo eunn doare da ziskleria pe da anzañ hor feiz, hag a zeu d'eomp digant ann Ebestel.

G. *Livirit ar Gredo e brezounek.*

R. 1. Me a gred e Doue, ann Tad holl-c'halloudek, krouer ann env hag ann douar ;

2. Hag e Jezuz-Krist, he Vab unik, Hon Aotrou ;

3. A zo bet konsevet euz ar Spered-Santel, gannet gant ar Verc'hez Vari ;

4. En deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro ha sebeliet ;

5. A zo diskennet d'ann iferniou, ha resusitet ann trede deiz euz a varo da veo ;

6. A zo pignet enn envou, hag azezet enn tu deou da Zoue, ann Tad holl-c'halloudek;

7. Ac'hano e teui da varn ar re veo hag ar re varo;

8. Me a gred er Spered-Santel;

9. Ann Iliz santel katholik, communion ar Zent;

10. Remision ar pec'hejou;

11. Rezurreksion ar c'hig;

12. Ar vuez eternal. Evelse bezet great.

G. *Livirit-hi e latin?*

R. 1. Credo in Deum Patrem omnipotentem, creatorem cœli et terræ; — 2. et in Jesum Christum, Filium ejus unicum, Dominum nostrum; — 3. qui conceptus est de Spiritu Sancto, natus ex Mariâ Virgine; — 4. passus sub Pontio Pilato, crucifixus mortuus et sepultus; — 5. descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit à mortuis; — 6. ascendit ad cœlos, sedet ad dexteram Dei Patris omnipotentis; — 7. inde venturus est judicare vivos et mortuos; — 8. Credo in Spiritum Sanctum; — 9. Sanctam Ecclesiam catholicam, Sanctorum communionem; — 10. remissionem peccatorum; — 11. carnis resurrectionem; — 12. — vitam æternam. Amen.

G. *Ha kourmpren a c'hellomp-ni ann holl guirio-nezioù a zo merket er Gredo?*

R. Nann, n'e c'hellomp ket ho c'hourmpren holl, rak kalz anezho a zo misterioù.

G. *Petra eo eur mister?*

R. Eur mister a zo eur virionez ne c'hellomp ket da gourmpren, hag a dleomp kredi evelato, abalamour m'eo bet diskleriet gant Doue, rak

Doue ne c'hell na fazia he-unan nag hon lakaat da fazia.

TREDE KENTEL

KENTA ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

Me a gred e Doue, ann Tad holl-c'halloudek, krouer ann env hag ann douar.

G. *Petra eo kenta tra a zesk d'eomp ar Gredo?*

R. Kenta tra a zesk d'eomp ar *Gredo* eo ez euz eunn Doue.

G. *Petra eo Doue?*

R. Doue a zo eur spered infinimant parfet; krouet en deuz ann env hag ann douar, ha mestr eo var gement tra a zo heb kaout he-unan mestr ebed.

G. *Perak e livirit-hu eo Doue eur spered?*

R. Me lavar eo Doue eur spered abalamour n'en deuz ket a gorf, ha ne c'hellomp nag he velet gant hon daoulagad, na touch outhan gant hon daouarn.

G. *Perak e livirit-hu eo infinimant parfet?*

R. Abalamour m'en deuz ann holl berfeksionou, hag ar perfeksionou-ze n'euz fin ebed d'ezho.

G. *Doue hag hen zo bet ato?*

R. Ia, Doue zo bet a holl-viskoaz hag a vezo da virviken.

G. *E pe leac'h ema Doue?*

R. Doue a zo enn env, var ann douar hag e peb leac'h.

G. *Doue hag hen a zo holl-c'halloudek?*

R. Ia, mestr eo var bep tra hag ober a c'hell ar peza gar.

G. *Doue hag hen a vel peb tra?*

R. Ia, Doue a vel asambles ar peza a zo bet, a zo hag a vezo, ha lenn a ra enn hor c'haloun ar sonjour ar muia kuzet.

G. *Doue hag hen a gemer soursi euz a bep tra?*

R. Ia, Doue a gemer soursi euz a bep tra, euz ann traou distera kerkouls hag euz ar re vrasa.

G. *Doue hag hen a c'houarn ar bed?*

R. Ia; Doue a c'houarn ar bed dre he brovidans, ha ne erru netra nemed dre ma fell d'ezhan pe dre ma lez ober.

G. *Doue hag hen zo just?*

R. Ia, Doue a zo just, ha ganthan peb hini a gav ato dioc'h ma ra.

G. *Doue hag hen zo trugarezuz?*

R. Ia, Doue a zo trugarezuz; c'hoant en deuz da zavetei ann dud holl, ha pardouni a ra d'ar brasa pec'herien p'o deuz keuz d'he veza offanset.

PEDERVED KENTEL

MISTER ANN DREINDED

G. *Petra eo mister ann Dreinded?*

R. Eunn Doue hebken e tri ferson : ann Tad, ar Mab, hag ar Spered-Santel.

G. *N'ez euz nemed eunn Doue hebken?*

R. Nann, n'ez euz ha ne c'hell beza nemed eunn Doue hebken.

G. *Hag ez euz tri ferson e Doue?*

R. Ia, tri ferson a zo e Doue : ann Tad, ar Mab, hag ar Spered-Santel.

G. *Ann Tad hag hen zo Doue?*

R. Ia, ann Tad zo Doue.

G. *Ar Mab hag hen zo Doue?*

R. Ia, ar Mab zo Doue.

G. *Ar Spered-Santel hag hen zo Doue?*

R. Ia, ar Spered-Santel a zo Doue.

G. *Neuze ez euz tri Doue?*

R. Nann, ann tri ferson-ze ne d-int ho zri nemed eur memes Doue hebken.

G. *Perak ne d-int ho zri nemed eur memes Doue hebken?*

R. Abalamour n'o deuz ho zri nemed eur memes natur hebken, hag ann natur-ze eo natur Doue.

G. *Ann tri ferson-ze hag hi a zo par ann eil d'egile e peb tra?*

R. Ia, par int ann eil d'egile e peb tra : bez' ez int ker braz ha ker gallouduz ann eil hag egile, ha bet int bet ho zri a holl-viskoaz.

PEMPED KENTEL

ANN ELEZ

G. *Petra ziniñ ar c'homzou-ma euz ar Gredo : krouer ann env hag ann douar?*

R. Ar c'homzou-ze a ziniti en deuz great Doue euz a netra ann env, ann douar ha kement tra a zo.

G. *Pere eo ar harfeta euz ann holl grouadurien?*

R. Ann elez hag ann dud.

G. *Petra eo ann elez?*

R. Ann elez a zo sperejou pur krouet gant Doue evit he adori hag he zervicha.

G. *E pe stad e krouaz Doue ann elez?*

R. Doue a grouaz ann holl elez enn eur stad santel.

G. *Ha kendalc'het o deuz-hi holl er stad-se?*

R. Nann, darn anezho o deuz kendalc'het, mes darn all a zo kouezet dre ho ourgouill.

G. *Penaoz e hanver ann elez a zo kouezet dre ho ourgouill?*

R. Ho henvel a reer ann drouk-elez, ann drouk-sperejou, ann diaoulou.

G. *Petra deuaz ann drouk-elez da veza goude ho fec'hed?*

R. Doue ho c'hasaz kuit euz ann env hag ho stlapaz enn ifern, el leac'h ma c'houzanvont poaniou hag a bado va viken.

G. *Ann drouk-sperejou hag hi a zo var hon tro-ni?*

R. Ia, ato emaint var hon tro, o klask hon dougen d'ann drouk hag hor chacha gantho d'ann ifern.

G. *Penaoz e hanver ann elez o deuz kendalc'het er stad m'oant bet krouet?*

R. Ho henvel a reer ann elez mad pe ann elez hebken.

G. *Petra eo deuet ann elez mad da veza?*

R. Ann elez mad a zo euruz enn env o velet Doue, ha ne vank netra d'ho joauzed.

G. *Ann elez mad ha n'o deuz-hi ket eunn dra bennak da ober enn hor c'henver-ni?*

R. Eo, Doue en deuz roet da bep hini ac'hannomp eunn eal, hag a hanver ann Eal Gardian.

G. *Pe seurt soursi en deuz hon Eal Gardian ac'hanomp-ni?*

R. Pedi a ra evidomp, kinnig a ra da Zoue hor pedennou hag hon oberiou mad, hon difenn a ra a enep ann drouk-sperejou, hag hon diouall a ra enn danjeriou.

G. *Pere eo hon deveriou-ni e kenver hon Eal Gardian?*

R. Ni a dle klaout respet hag anaoudegez vad evit hon Eal Gardian, ha beza leunn a fizians ennhan.

C'HOUEC'HVED KENTEL

ANN DEN

G. *Petra en deuz roet Doue d'comp-ni oc'h hon lakaat er bed?*

R. Roet en deuz d'comp eur c'horf hag eunn ene.

G. *Pe ar c'horf, pe ann ene, eo al lodenn vella euz ann den?*

R. Ann ene eo al lodenn vella abalamour ma'z

eo eur spered ha ne varv ket, krouet henvel ouz Doue ha goest d'he anaout ha d'he garet.

G. *Evit petra en deuz Doue hor c'hrouet-ni hag hon lakeat er bed?*

R. Doue en deuz hor c'hrouet hag hon lakeat er bed evit he anaout, he garet, he zervicha, hag erruout evelse e gloar ar baradoz.

G. *Pere eo ann daou zen kenta a zo bet krouet gant Doue?*

R. Adam hag Eva, hanvet hon tad hag hor mamm genta, abalamour m'eo deuet ann holl dud anezho ho daou.

G. *E pe stad e krouaz Doue Adam hag Eva?*

R. Doue a grouaz Adam hag Eva enn eur stad santel, hag a lakeaz anezho e baradoz ann douar.

G. *Kendalc'her a rejont-hi er stad euruz-ze?*

R. Nann, touellet e ouent gant ann drouk-spered, hag e tizentchont ouz Doue enn eur zibri euz ar frouez a ioa bet difennet outho.

G. *Petra erruaz gantho dre ho dizentidigez?*

R. Dre ho dizentidigez, Adam hag Eva a gollaz gras Doue hag a veritaz ann ifern; kaset e ouent er meaz euz a varadoz ann douar, ha koundaonet da boaniou ar vuez ha d'ar maro.

G. *Pec'hed hon tad hag hor mamm genta hag hen a zo bet noazuz d'eomp-ni?*

R. Ia, rak abalamour d'ar pec'hed-se e c'hanomp hon-unan e stad a bec'hed.

G. *Penaoz e hanver ar pec'hed a zeu ganeomp var ann douar?*

R. Ar pec'hed orijinel.

G. *Petra denn ar pec'hed orijinel d'he heul evit ar bed-ma?*

R. Ann denvalijen e spered ann den, ann tech d'ann drouk enn he volonteiz, poaniou ar vuez hag ar maro.

G. *Ha petra denn d'he heul evit ar bed all?*

R. Ar re a varv gant ar pec'hed orijinel ne c'hellont ket mont da velet Doue d'ar baradoz.

G. *Ar Verc'hez Vari hag hi a zo bet diouallet dioc'h ar pec'hed orijinel?*

R. Ia, ar Verc'hez Vari a zo bet diouallet dioc'h ar pec'hed orijinel dre veritou Jezuz-Krist. N'euz den all ebet nemethi hag en defe bet ar c'hras-se, ha setu ar pezh a hanver : ar c'hras da veza bet konsevet hep pec'hed.

SEIZVED KENTEL

EIL HA TREDE ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

E Jezuz-Krist, he Vab unik, Hon Aotrou ; — A zo bet konsevet euz ar Spered-Santel, ganet gant ar Verc'hez Vari.

G. *Doue hag hen en devoue c'hoaz karantez evit ann dud goude pec'hed hon tad hag hor mamm genta?*

R. Ia, p'e guir e lavaras e roje d'ezho eur Zalver.

G. *Piou eo ar Zalver-ze?*

R. Ar Zalver-ze eo Hon Aotrou Jezuz-Krist.

G. *Petra eo Jezuz-Krist?*

R. Jezuz-Krist eo Mab Doue en em c'hreat den evit hor zavetei.

G. Doue ann Tad hag hen a zo en em c'hreat den?

R. Nann.

G. Doue ar Spered-Santel hag hen a zo en em c'hreat den?

R. Nann, Doue ar Mab hebken a zo en em c'hreat den evidomp.

G. Penaoz eo Mab Doue en em c'hreat den?

R. O kemeret eur c'horf hag eunn ene, henvel oc'h hon re-ni, e korf ar Verc'hez gloriuz Vari.

G. Penaoz e hanver mister Mab Doue en em c'hreat den evit hor zavetei?

R. Hanvet eo mister ann Inkarnasion.

G. Jezuz-Krist hag hen a zo Doue ha den asambles?

R. Ia, Jezuz-Krist a zo guir Doue ha guir den asambles.

G. Ped natur a zo e Jezuz-Krist?

R. E Jezuz-Krist ez euz diou natur : natur Doue ha natur ann den.

G. Bez'ez euz ive daou bersounach e Jezuz-Krist?

R. Nann, n'ez euz nemed unan, persounach Mab Doue.

G. Perak e livirit-hu eo Jezuz-Krist mab unik da Zoue ann Tad?

R. Abalamour Doue ann Tad n'en deuz nemed eur Mab hag e ve Doue evel d'han.

G. Perak e rit-hu Hon Aotrou anez'han?

R. Abalamour ma'z eo hon Doue, hor Zalver, hor Mestr, ha ma tleomp senti outhan.

G. Petra ziniñ ar c'homzou-ma : a zo bet kon-sevet euz ar Spered-Santel?

R. Ar c'homzou-ze a ziniñ eo bet furmet korf Jezuz-Krist dre c'halloud pe dre vertuz ar Spered-Santel.

G. Petra ziniñ ar c'homzou-ma : ganet gant ar Verc'hez Vari?

R. Ar c'homzou-ze a ziniñ e deuz ar Verc'hez Vari lakeat Jezuz-Krist er bed heb paouez da veza guerc'hez.

G. Ar Verc'hez Vari hag hi a zo mamm da Zoue?

R. Ia, ar Verc'hez Vari a zo e guirionez mamm da Zoue, p'e guir e deuz lakeat er bed eur mab hag a zo Doue.

G. Pe da zeiz eo ganet Jezuz-Krist?

R. Jezuz-Krist a zo ganet da zeiz Nedelek, enn eur c'hraou e Bethleem.

G. Penaoz e tremenaz ann tregont vloaz kenta euz he vuez?

R. Ho zremen a eure e Nazareth, o labourat hag o senti.

G. Petra reaz goudeze?

R. Goudeze e prezegaz ann Aviel epad tri bloaz, enn eur ober miraklou braz.

EIZVED KENTEL

PEVARE ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

En deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro ha sebeliet.

G. Ar Juvezien hag hi a anavezaz Jezuz-Krist evit Mab da Zoue?

R. Nann, ober a rejont brezel d'ezhan enn despet d'he vadoberiou ha d'he viraklou, ha goulenn a rejont ma vije lakeat d'ar maro.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : en deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi en deuz Jezuz-Krist gouzanvet ar poaniou ar re grisa, enn amzer ma oa Pons-Pilat gouarnar ar Judee.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : a zo bet kru sifiet, maro ha sebeliet?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e oue staget Jezuz-Krist ouz eur groaz, e varvaz eno, hag e oue goudeze lakeat he gorf er bez.

G. *Pe da zeiz eo maro Jezuz-Krist?*

R. Da zeiz Guener ar Groaz.

G. *Perak eo maro Jezuz-Krist var ar groaz?*

R. Jezuz-Krist a zo maro var ar groaz evit hon tenna euz ar stad a bec'hed ha divar hent ann ifern, ha meritout d'eomp euruzded ar baradoz.

G. *Penaoz en deuz Jezuz-Krist hor prenet-ni?*

R. Jezuz-Krist en deuz hor prenet o c'houzanv hag o vervel evidomp evel den, hag o rei, evel Doue, eur priz heb muzul d'he boaniou.

G. *Penaoz e hanver mister Jezuz-Krist maro var ar groaz evit hor prena?*

R. Hanvet eo mister ar Redempcion.

NAVED KENTEL

PEMPED, C'HOUEC'HVED HA SEIZVED ARTIKL
EUZ AR *Gredo*.

A zo diskennet d'ann iferniou, ha resusitet ann trede deiz euz a varo da veo : — A zo pignet enn envou hag azezet enn tu deou da Zoue, ann Tad holl-c'halloudek ; — Ac'hano e teul da varn ar re veo hag ar re varo.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : a zo diskennet d'ann iferniou ?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e tiskennaz ene Jezuz-Krist, goude m'oa bet dispartiet diouz he gorf, el leac'h m'edo eneou ann dud just a ioa maro abaoe ar penn kenta euz ar bed.

G. *Perake tiskennaz ene Jezuz-Krist el leac'h-se?*

R. Evit konsoli eneou ann dud just ha lavaret d'ezho ez ajent ganthan d'ar baradoz.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : resusitet ann trede deiz euz ar varo da veo ?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e reaz Jezuz-Krist d'he ene distrei enn he gorf, d'ann trede deiz goude he varo, hag e savaz euz ar bez leun a vuez.

G. *Pe da zeiz eo resusitet Hor Zalver?*

R. Da genver ar Zul Fask.

G. *Jezuz-Krist hag hen a jomaz var ann douar goude he rezurreksion ?*

R. Ia, Jezuz-Krist a jomaz daou-ugent devez var ann douar goude he rezurreksion, hag epad

ann amzer-ze ec'h en em ziskouezaz aliez d'he ziskibien hag e roaz d'ezho he genteliou diveza.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : a zo pignet enn env ?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e pignaz Jezuz-Krist enn env korf hag ene, dre he c'halloud he-unan.

G. *Pe da seiz eo pignet Jezuz-Krist enn env* ?

R. Da zeiz ar Iaoù-Bask, daou-ugent devez goude he rezurreksion.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : azezet enn tu deou da Zoue ann Tad holl-c'halloudek ?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi eo Jezuz-Krist, evel Doue, par d'he Dad e peb tra, hag en deuz, evel den, muioc'h a c'hloar hag a c'halloud eged nikun euz ar grouadurien.

G. *E pe leac'h ema brema Jezuz-Krist* ?

R. Jezuz-Krist a zo enn env, ha var ann douar e sakramant ann aoter.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma* : ac'hano e teui da varn ar re veo hag ar re varo ?

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e vezo guelek Jezuz-Krist o tiskenn euz ann env da fin ar bed, evit barn ann holl dud.

DEKVED KENTEL

EIZVED ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

Me a gred er Spered-Santel.

G. *Petra eo ar Spered-Santel* ?

R. Ar Spered-Santel eo ann trede persounach

euz ann Dreinded Sakr, hag a zo Doue evel ann Tad hag ar Mab, ha par d'ezho e peb tra.

G. *E pe leac'h ema ar Spered-Santel* ?

R. Ar Spered-Santel a zo e peb leac'h, p'e guir eo Doue.

G. *E pe leac'h ema dreist holl* ?

R. Ar Spered-Santel a zo dreist holl enn eneou just a garg euz he c'hrasou hag euz he zonezou-nou.

G. *Pere eo donezounou ar Spered-Santel* ?

R. Seiz zo an'ezho : ar furnez, ar skiant, ar guzul, ann nerz, ar vouiziegezh, ann devosion hag ann donezoun a zoujans Doue.

G. *Ar Spered-Santel hag hen a zo bet guelek avechou o tiskenn euz ann env* ?

R. Ia, ar Spered-Santel a zo bet guelek o tiskenn euz ann env dindan furm eur goulm, pa oue badezet Hor Zalver, ha dindan furm teodou tan da zeiz ar Pantekost.

UNNEKVED KENTEL

NAVED ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

Ann Iliz katholik ; — Kommunion ar Zent.

G. *Petra eo ann Iliz* ?

R. Ann Iliz eo ann oll Gristenien fidel, gouarnet gant hon Tad Santel ar Pab ha gant ann Eskibien a zo a-unan gant ar Pab.

G. *Piou eo ar penn enn Iliz* ?

R. Ar penn enn Iliz eo Jezuz-Krist, ann hini en deuz he zavet.

G. *Var ann douar ha n'euz ket c'hoaz eunn all hag a zo ar penn enn Iliz ?*

R. Eo, var ann douar ez euz eunn all hag a zo ar penn enn Iliz ; hennez eo ar Pab, a zalc'h plas sant Pêr hag a zo Vikel Jezuz-Krist.

G. *Pere eo memprou ann Iliz ?*

R. Memprou ann Iliz eo ann holl dud badezet, pe hi a zo e stad a c'hras, pe hi a zo e stad a be-c'hed, nemed distaget e vent bet diouthi.

G. *Penaoz e vezer distaget dioc'h ann Iliz ?*

R. Distaget e vezer dioc'h ann Iliz dre ann he-rezi, dre ar chism ha dre ann eskummunugenn.

G. *Hag hen a zo ouspenn eunn Iliz ?*

R. Nann, n'ez euz nemed eur guir Iliz, hag er meaz euz ann Iliz-se ne c'heller ket beza salvet.

G. *Pere eo ar merkou evit anaout ar guir Iliz ?*

R. Ar guir Iliz a zo unan, santel, katholik hag abostolik.

G. *Petra ententit-hu pa livirit eo unan ann Iliz ?*

R. Me entent n'o deuz holl vemprou ann Iliz nemed eur memes kredenn hag e sentont ouz ar memes Pab.

G. *Petra ententit-hu pa livirit eo santel ann Iliz ?*

R. Me entent eo santel ann hini en deuz he zavet, santel ar relijion a brezeg, hag e ra tud santel.

G. *Petra ententit-hu pa livirit eo katholik ann Iliz ?*

R. Me entent eo bet hag e vezo e peb amzer, hag eo skignet e peb leac'h.

G. *Petra ententit-hu pa livirit eo abostolik ann Iliz ?*

R. Me entent e teu digant ann Ebestel, hag eo gouarnet gant ar re a zalc'h ho flas.

G. *Pehini eo ann Iliz a zoug ann holl merkou-ze euz ar guir Iliz ?*

R. Ann Iliz romen, hag hi hebken, a zoug ann holl merkou-ze euz ar guir Iliz.

G. *Perak e rit-hu Iliz romen anezhi ?*

R. Abalamour ar Pab a zalc'h plas sant Per, kenta vikel Jezuz-Krist var ann douar, ha sant Per a deuz da jom da Rom hag a varvaz eno.

G. *Penaoz e c'houzoc'h-hu emaoc'h er guir Iliz ?*

R. Me c'hoar emaoun er guir Iliz abalamour va fersoun a zo a-unan gant ann Aotrou'nn Eskop, hag ann Aotrou'nn Eskop a zo a-unan gant ar Pab, tad ann holl Gristenien.

G. *Pere eo hon deveriou-ni e kenver ann Iliz ?*

R. Hon dever eo kredi ar pezh a zesk d'eomp ann Iliz, hag ober ar pezh a c'houre hemenn.

G. *Ann Iliz hag hi a c'hell fazia er pezh a zesk d'eomp ?*

R. Nann, ann Iliz ne c'hell ket fazia, abalamour m'en deuz lavaret Jezuz-Krist e vije betek fin ar bed gant he Ebestel ha gant ann Eskibien var ho lerc'h.

G. *Ar Pab hag hen a c'hell fazia er gelennadurez a ro d'ann dud fidel ?*

R. Nann, ar Pab ne c'hell ket fazia pa verk d'ann Iliz enn he fez, evel doktor ann holl Gristenien, ar pezh a ranker da gredi pe da ober evit beza salvet.

G. *Ann Iliz hag hi a dle kaout aoun da veza diskaret gant ann dud difeiz ?*

R. Nann, rak Jezuz-Krist en deuz lavaret ne vije biken ann ifern treac'h d'ezhi.

DAOUZEKVED KENTEL

FIN ANN NAVED, HA DEKVED ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

Kommunion ar Zent ; — Remision ar pec'hejou.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma : Kommunion ar Zent ?*

R. Ar c'homzou-ze a zinifi eo holl vemprou ann Iliz evel ar memproù euz eur memes korf hag o deuz perz holl er memes madou spirituel.

G. *Pere eo ar madou spirituel m'o deuz ann holl dud fidel perz enno ?*

R. Ar madou spirituel m'o deuz ann holl dud fidel perz enno eo : sakrifis santel ann offerenn, ar zakramanchou, ann induljansou, ar bedenn hag ann oberiou mad.

G. *Ann dud fidel a zo var ann douar, penaoz emaint-hi etrezho evel ar memproù euz eur memes Korf ?*

R. Dre ar pedennou hag ann oberiou mad a reont ann eil evit egile.

G. *Ar zent a zo er baradoz ha ni, ha bez' ez ounp ive evel ar memproù euz eur memes korf ?*

R. Ia, rak ni a henor hag a bed ar zent-se, hag hi a bed evidomp d'ho zro.

G. *Hag anaoun ar purkator ha ni ?*

R. A zo c'hoaz evel ar memproù euz eur memes korf ; rak ni a c'hell rei didorr d'ann eneoù keiz-ze enn ho foan dre hor pedennou hag hon oberiou mad, ha dreist oll dre zakrifis santel ann offerenn.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma : Remision ar pec'hejou ?*

R. Ar c'homzou-ze a zinifi en deuz roet Jezuz-Krist d'he Iliz ar c'halloud da bardouni ann holl bec'hejou, n'euz forz peger grevuz e vent, dre ar zakramanchou.

TRIZEKVED KENTEL

UNNEKVED HA DAOUZEKVED ARTIKL EUZ AR *Gredo*.

Rezurreksion ar c'hig ; — Ar vuez eternel.

G. *Pe seurt sonj a zigas enn hor spered ann daou artikkel diveza euz ar Gredo ?*

R. Ar zonj euz hor finvezioù diveza.

G. *Pere eo finvezioù diveza ann den ?*

R. Ar maro, ar varn, ar baradoz hag ann ifern.

G. *Petra eo ar maro ?*

R. Ar maro eo ann disparti etre ar c'horf hag ann ene.

G. *Peur a varvimp-ni ?*

R. Ne c'houzomp nag ann deiz, nag ann heur ; rak-se e tleomp beza ato prest da rei eunn ene mad da Zoue.

G. *Da be leac'h ez ai hon ene goude ar maro?*

R. Goude ar maro, hon ene a ielo dirak Doue, evit beza barnet var ar mad hag ann drouk en de-vezo great; setu ar pezh a hanver ar varn parti-
kulier.

G. *Hag hor c'horf petra devio da veza?*

R. Goude ar maro, hor c'horf a zeuio da vreina ha da goueza e poultr, betek ma savo adarre euz a varo da veo evit ar varn jeneral.

G. *Ha goude ar varn partikulier, da be leac'h ez ai hon ene?*

R. Goude ar varn partikulier, hon ene a ielo d'ar baradoz, pe d'ann ifern, pe d'ar purkator, dioc'h m'en devezo meritet.

G. *Petra eo ar purkator?*

R. Ar purkator a zo eur plas a boaniou, hag eno eneo ann dud just a beur-c'hra ho finijenn abarz mont d'ar baradoz.

G. *Pere eo ann eneo a ia d'ar purkator?*

R. Ann eneo a ia d'ar purkator eo ar re a zo neat a bec'hed marvel enn heur ar maro, mes n'o deuz ket c'hoaz peur-baet ho dle da justis Doue.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma : Resurreksion ar c'hig?*

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e tistroio adarre, da fin ar bed, eneo ann dud varo er c'horfou o de-vezo bet var ann douar.

G. *Perak e resusito ar c'horfou?*

R. Ar c'horfou a resusito evit kemeret perzh e gloar pe e tourmanchou ann ene.

G. *Petra erruo goudeze?*

R. Ann dud holl en em gavo dirak Jezuz-Krist

evit beza barnet; setu ar pezh a hanver ar varn jeneral pe ar varn ziveza.

G. *Petra devio ann dud da veza goude ar varn jeneral?*

R. Ar re just a ielo d'ar baradoz, hag ar re fall a vezo stlapet enn ifern.

G. *Petra eo ar baradoz?*

R. Ar baradoz a zo eur plas dudiuz el leac'h ma vezo ar zent euruz da viken o velet hag o karet Doue.

G. *Piou a ia d'ar baradoz?*

R. Ar re a varv e stad a c'hras hag o deuz peur-baet ho dle da justis Doue.

G. *Petra eo ann ifern?*

R. Ann ifern a zo eur plas a dourmanchou, hag eno ann dud fall a vezo da viken dalc'het pell dioc'h Doue ha tourmantet gant ann drouk-sperejou.

G. *Pe seurt poaniou a andurer enn ifern?*

R. Ann dud daonet o deuz diou boan da c'houl-
zanv : ar boan da veza kollet Doue hag ar boan da leski enn tan, hag ann diou boan-ze a bado da viken.

G. *Piou a ia d'ann ifern?*

R. Ar re a varv e stad a bec'hed marvel.

G. *Petra zinifi ar c'homzou-ma : Ar vuez eter-nel?*

R. Ar c'homzou-ze a zinifi e vezo ar zent euruz da viken er baradoz ha ne vanko netra d'ho eu-ruzed.

EIL LODENN

AR PEZ A ZO RED DEOMP DA OBER

PEVARZEKVED KENTEL

GOURC'HEMENNOU DOUE

G. *Hag aoualc'h eo, evit beza salvet, kredi ar
guirioneziou a zesk d'eomp al lezenn gristen ?*

R. Nann, red eo c'hoaz miret gourc'hemennou
Doue ha re ann Iliz, hag en em ziuall dioc'h ar
pec'hed.

G. *Ped gourc'hemenn Doue a zo ?*

R. Dek zo anezho.

G. *Livirit-hi.*

- R. 1. Eunn Doue hebken a adori,
Ha dreist peb tra holl a giri.
2. E vean he hano ne doui ket,
Nag ive netra all ebed.
3. Ar zuliou santel a viri
E servich Doue, oc'h he veuli.
4. Da dad, da vamm a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Diouall na lazi den ebed,
Nag a zezir nag a effed.
6. Lubrik ne vezi ket ivez,
Nag a gorf nag a volonteiz.

7. Laerez na miret madou den
Gant gouiziegez ne ri biken.
8. A nep den fals testeni,
Na gaou ebed ne liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil n'en em lezi.
10. Na souhet madou da hentez,
Evit ho c'haout dre falsentez.

G. *Hag eunn dever eo d'eomp gouzout ar gour-
c'hemennou-ze ?*

R. Ia, eunn dever eo d'eomp ho gouzout, ha
mad eo ho lavaret aliez.

PEMZEKVED KENTEL

KENTA GOURC'HEMENNOU DOUE

Eunn Doue hebken a adori,
Ha dreist peb tra holl a giri.

G. *Petra ordren d'eomp ar c'henta gourc'hemenn
a Zoue ?*

R. Ar c'henta gourc'hemenn a Zoue a ordren
d'eomp he adori hag he garet.

G. *Penaoz e reomp-ni ann dra-ze ?*

R. Ann dra-ze a reomp dre ar Feiz, ann Espe-
rans hag ar Garantiz, a hanver vertuziou *theological*,
ha dre ar vertuz a relijion.

G. *Petra eo eur vertuz theological ?*

R. Eur vertuz *theological* eo ann hini a zo da
genta ha dreist peb tra hano ganthi euz a Zoue.

AR FEIZ

G. *Petra eo ar Feiz?*

R. Ar Feiz a zo eur vertuz dreist natur hag a ra d'eomp kredi stard ann holl guirioneziou a zo bet diskleriet gant Doue, hag a ordren d'eomp ann Iliz da gredi.

G. *Perak e tleomp-ni kredi ar guirioneziou-ze?*

R. Abalamour m'eo Doue ar virionez memes, ha ne c'hell na fazia he-unan, nag hon lakaat da fazia.

G. *Grit eunn akt a Feiz?*

R. Va Doue, me a gred stard kement tra oc'h euz diskleriet hag a ordren d'inn ann Iliz da gredi, abalamour ma'z oc'h ar virionez memes, ha ne c'hellit na fazia hoc'h-unan, nag hon lakaat da fazia.

G. *Piou eo ar re a bec'h a enep ar Feiz?*

R. Ar re a bec'h a enep ar Feiz eo ann dud ne fell ket dez'ho kredi eur virionez bennag diskleriet gant Doue, pe a zalc'h douetans varnhi enn ho spered.

G. *Piou a bec'h c'hoaz a enep ar Feiz?*

R. Ar re a zo lezirek da zeski guirioneziou ar relijion, hag ann dud o deuz mez o tiskouez int kristenien.

ANN ESPERANS

G. *Petra eo ann Esperans?*

R. Ann Esperans a zo eur vertuz dreist natur hag a ra d'eomp gortoz digant Doue, gant eur fizians parfet, he c'hrasou er bed-ma hag ar baradoz er bed-all.

G. *Var betra eo harpet hon Esperans-ni?*

R. Hon Esperans a zo harpet var madelez Doue hag he bromesaou, ha var meritou Jezuz-Krist.

G. *Grit eunn akt a Esperans.*

R. Va Doue, me a esper digant ho madelez ha dre veritou Jezuz-Krist, va Zalver, ho krasou er bed-ma hag ar baradoz er bed-all, abalamour m'oc'h euz lavaret ho rojac'h d'inn ha ma talc'hit ato d'ho ker.

G. *Penaoz e pec'her a enep ann Esperans?*

R. Pec'hi a reer a enep ann Esperans e diou feson : da genta, o kounta re var madelez Doue pe var hon nerz hon-unan, ha d'ann eil, o tisfiziout euz a vadelez Doue pe o kredi ne c'hellomp ket beza salvet.

C'HOUEZEKVED KENTEL

AR GARANTEZ

G. *Petra eo ar Garantez?*

R. Ar Garantez a zo eur vertuz dreist natur hag a ra deomp karet Doue dreist peb tra hag abalamour d'ezhan he-unan, hag hon nesa eveldomp hon-unan abalamour da Zoue.

G. *Petra eo karet Doue dreist peb tra?*

R. Karet Doue dreist peb tra a zo he garet muioc'h eged hor madou, hor c'herent, hor buez zoken, ha beza prest da vervel kentoc'h eged he ofiansi dre ar pec'hed marvel.

G. *Petra eo karet Doue abalamour d'ezhan he-unan?*

R. Karet Doue abalamour d'ezhan he-unan a zo he garet abalamour ma'z eo infinimant mad hag infinimant din da veza karet.

G. *Petra eo karet hon nesa eveldomp hon-unan ?*

R. Karet hon nesa eveldomp hon-unan a zo reketi hag ober d'ezhan ar memes mad a garfemp a ve great d'eomp hon-unan.

G. *Petra eo karet hon nesa abalamour da Zoue ?*

R. Karet hon nesa abalamour da Zoue a zo he garet abalamour m'eo karet gant Doue, hag abalamour Doue he-unan a ordren d'eomp he garet.

G. *Piou eo hon nesa ?*

R. Hon nesa eo kement den a zo, memes hon enebourien.

G. *Ha red eo d'eomp-ni karet hon enebourien ?*

R. Ia, Jezuz-Krist a ordren d'eomp pardouni d'hon enebourien, ho c'haret ha beza prest da ober vad d'ezho.

G. *Penaoz e tiskouezomp-ni hor c'harantez e kenver ann nesa ?*

R. Dre ann oberiou a drugarez a ra vad d'he gorf pe d'he ene, ha dreist holl dre ann aluzenn.

G. *Ha red eo ober aluzenn ?*

R. Ia, kement hini a c'hell dioueret eunn dra bennag gant ar paour a dle ober aluzenn.

G. *Grit eunn akt a Garantez ?*

R. Va Doue, me ho kar a greiz va c'haloun ha dreist kement tra a zo, abalamour ma'z oc'h infinimant mad hag infinimant din da veza karet ; me a gar ive va nesa eveldon va-unan abalamour d'eoc'h.

G. *Ha red eo kaout Feiz, Esperans ha Karantez evit beza salvet ?*

R. Ia, heb Feiz, Esperans ha Karantez, ne c'hell den plijout da Zoue.

G. *Hag ober a dleer avechou aktou a Feiz, a Esperans hag a Garantez ?*

R. Ia, ober a dleer avechou aktou a Feiz, a Esperans hag a Garantez, dreist holl pa vezer tentet a enep ar vertuziou-ze, pa dostaer ouz ar zakramenchou, ha p'en em gaver e danjer a varo.

SEITEKVED KENTEL

DIVARBENN AR VERTUZ A RELIJION

G. *Petra eo ar vertuz a Relijion ?*

R. Eur vertuz eo hag a ra d'eomp henori Doue egiz ma'z eo dleet.

G. *Petra rankomp da ober evit henori Doue egiz ma'z eo dleet ?*

R. Evit henori Doue egiz ma'z eo dleet, e rankomp : da genta, he adori, da lavaret eo he anaout evit ann hini a zo mestr var bep tra ha n'en deuz he-unan mestr ebed ; d'ann eil, he drugarekaat evit he vadoberiou, ha d'ann trede, goulenn diganthan he c'hrasou hag ar pardoun euz hor pec'hejou.

G. *Ha ni a c'hell adori ar Zent ?*

R. Nann, ne c'hellomp ket adori ar Zent ; mes ho henori a reomp, abalamour ma'z int mignouned da Zoue hag hon difennourien dirazhan.

G. *Hag ar Verc'hez Vari, he adori e c'hellomp-ni ?*

R. Nann, ne c'hellomp ket adori ar Verc'hez ken nebeut; brasoc'h henor goulskoude a dleomp d'ezhi eged d'ar Zent, abalamour ma'z eo mamm da Zoue hag ar zantela euz ann holl grouadurien.

G. *Ha ni a dle henori relegou ar Zent?*

R. Ia, ho henori a dleomp, abalamour ma'z int ar pe'z a jom euz ar c'horfou a zo bet templou d'ar Spered-Santel, hag a zavo adarre euz ho beziou leun a c'hloar.

G. *Ha ni a dle ive henori imachou ar Verc'hez hag ar Zent?*

R. Ia, rak oc'h henori ann imachou-ze ec'h henoromp ar Verc'hez hag ar Zent ho-unan.

G. *Hag ar Groaz, ar Galoun-Zakr hag imachou Jezuz-Krist, ho henori a dleomp-ni?*

R. Ia, rak dre eno ec'h henoromp Jezuz-Krist he-unan.

G. *Penaoz e pec'her a enep ar vertuz a Relijion?*

R. Pec'hi a reer a enep ar vertuz a Relijion dre idolatri, dre superstision ha dre zefot respet.

G. *Penaoz e pec'her dre idolatri?*

R. Oc'h adori ar grouadurien e plas ann Aotrou Doue.

G. *Penaoz e pec'her dre superstision?*

R. O lakaat he fizians e komzou pe e traou hag a zo koundaonet gant ann Iliz.

G. *Penaoz e pec'her dre zefot respet?*

R. O veva evel eur paian, o tisprijout ann traou sakr pe oc'h ober implij fall anezho, hag o teuler dismegans var ann dud konsakret da Zoue.

TRIVACHVED KENTEL

EIL GOURC'HEMENN DOUE

E vean he hano ne doui ket,
Nag ive netra all ebed.

G. *Petra zifenn ouzomp ann eil gourc'hemenn a Zoue?*

R. Ann eil gourc'hemenn a Zoue a zifenn ouzomp : da genta, toui e vean ; d'ann eil, blasfemi, ha d'ann trede, mankout d'ar veuiou on euz great.

G. *Petra eo toui?*

R. Toui, pe ober le, a zo kemeret Doue da dest eo guir ar pe'z a leverer.

G. *E ped fesoun e pec'her o toui?*

R. E teir fesoun : da genta, o toui, heb eur rezoun vraz : d'ann eil, o toui var ar gaou ; d'ann trede, o toui da ober drouk.

G. *Ha pec'hed zo ato o toui?*

R. Nann, n'euz ket a bec'hed o toui pa vez eur rezoun vraz evit hen ober, evel pa lavar ar barner sevel ann dorn da rei testeni d'ar virionez.

G. *Petra eo blasfemi?*

R. Blasfemi a zo goallgomz a Zoue, euz ar Zent pe euz ann traou santel.

G. *Petra eo ober veu?*

R. Ober veu a zo lavaret da Zoue e raimp eunn dra vad bennag dindan boan a bec'hed.

G. *Ha mad eo ober veu?*

R. Ia, mes arabad eo hen ober re vuhan hag heb goulenn kuzul.

G. *Ha pec'hed eo mankout d'ar veuiou on euz great?*

R. Ia, pec'hed eo mankout d'ar veuiou on euz great, nemed dispans or befe bet.

NAONTEKVED KENTEL

TREDE GOURC'HEMENN DOUE

Ar zuliou santel a viri
E servich Doue, oc'h he veuli.

G. *Petra ordren d'eomp ann trede gourc'hemenn a Zoue ?*

R. Ann trede gourc'hemenn a Zoue a ordren d'eomp santifia ar zul.

G. *Petra ranker da ober evit santifia ar zul ?*

R. Evit santifia ar zul e ranker paouez da labourat, hag implija ann deiz-se e servich Doue.

G. *Pere eo al labouriou a zo difennet da zul ?*

R. Al labouriou a zo difennet da zul eo ar re m'en deuz ar c'horf muioc'h a berz enno eget ar spered, da lavaret eo, al labouriou a ra bemdez ar vicherourien hag ann devezourien evit gounid ho boued.

G. *Ha labourat a c'heller avechou da zul ?*

R. Ne c'heller labourat da zul nemet evit eur rezoun vraz bennag, ha mar tle al labour beza a vel d'ann holl, eo red goulenn kounje.

G. *Petra dleer da ober evit implija ar zul e servich Doue ?*

R. Red eo dreist peb tra klevet ann offerenn enn deiz-ze; eur pec'hed braz eo mankout d'ann offerenn heb rezoun vad ebed.

G. *Da be seurt offerenn e deuz c'hoant ann Iliz ez afemp ?*

R. Da offerenn bred ar barrez, abalamour eno e vez roet ann aliou ha great ar prezegenpou a c'hell ober vad d'hon ene.

G. *Penaoz e tleer klevet ann offerenn ?*

R. Red eo klevet ann offerenn penn-da-benn gant evez ha gant devosion.

G. *Petra ranker da ober c'hoaz evit santifia ervad ar zul ?*

R. Evit santifia ervad ar zul, e tlefet c'hoaz mont d'ann offisou all euz ann iliz ha d'ar zarmouniou, hag espern eur pennad bennag a amzer evit ann oberiou a drugarez.

UGENTVED KENTEL

PEVARE GOURC'HEMENN DOUE

Da dad, da vamm a henori,
Evit pell amzer ma vevi.

G. *Petra ordren d'eomp ar pevare gourc'hemenn a Zoue ?*

R. Ar pevare gourc'hemenn a Zoue a ordren d'eomp henori hon tad hag hor mamm, ho c'haret, senti outho hag ho zikour enn ho ezommou.

G. *Petra e tleomp-ni henori hon tad hag hor mamm ?*

R. Abalamour ma tale'hont enn hor c'henver plas ann Aotrou Doue.

G. *Ha red eo senti outho pa ordrenont eunn dra bennag kountrol da lezenn Doue ?*

R. Nann, neuze e ranker senti ouz Doue kentoc'h eged ouz ann dud.

G. Penaoz e tleomp-ni sikour hon tad hag hor mamm enn ho ezommou ?

R. Ho zikour a dleomp o rei skor d'ezho enn ho faourentez hag enn ho c'hozni, o lakaat digas ho zakramanchou d'ezho pa vezont klanv, hag o pedi evitho goude ho maro.

G. Pere eo deveriou ar zervicherien e kenver ho mistri ?

R. Ar zervicherien a dle respeti ho mistri, senti outho hag ho zervicha gant lealded.

G. Pere eo deveriou ar re a zo dindan re all e kenver ho superiores ?

R. Ar re a zo dindan re all a dle respeti ho superiores ha senti outho.

G. Pere eo deveriou ann tadou hag ar mammou e kenver ho bugale ?

R. Ann tadou hag ar mammou a dle karet ho bugale, pourvei d'ho ezommou, ho c'helenn var guirioneziou ar relijion, lammet ar plegou fall a remerkont ennho, ha rei skouer vad d'ezho.

G. Pere eo deveriou ar vistri e kenver ho zervicherien ?

R. Ar vistri a dle beza mad e kenver ho zervicherien, paea d'ezho ho c'houmanant, ha beza aketuz d'ho c'helenn ha da veilla var ho c'homportamant.

G. Pere eo deveriou ar superiores e kenver ar re a zo dindanho ?

R. Ar superiores a dle karet ar re a zo dindanho, ha rei d'ezho eur gelennadurez kristen ha skouer vad.

G. N'hor beuz-ni ket c'hoaz deveriou all da ober ?

R. Hon dever eo pedi evit ar re zo ouz hor gouarn.

G. Perak e tleomp-ni pedi evit ar re zo ouz hor gouarn ?

R. Pedi a dleomp evit ar re hor gouarn, abalamour eur c'houarnamant kristen a zalc'ho ar peoc'h er vro hag a vezo leal e kenver ann holl.

G. Penaoz hor bezo-ni eur c'houarnamant kristen ?

R. Eur c'houarnamant kristen hor bezo, pa zibabimp, evit hor gouarn, kristenien vad, leal ha gouizie.

G. Eunn dever eo mont da rei hor mouez pa vez votadek ?

R. Ia, eunn dever eo.

G. Eur pec'hed eo trei gant ann dud fall evit ar votadek ?

R. Ia, eur pec'hed eo.

G. Perak eo ann dra-ze eur pec'hed ?

R. Abalamour o rei hor mouez da dud fall e lakeomp d'hor gouarn enebourien Doue hag ar relijion, a zo ive enebourien ar vro.

KENTA KENTEL VAR'NN UGENT

PEMPED GOURC'HEMENN DOUE

Diouall na lazi den ebed,
Nag a galoun nag a effed.

G. Petra zifenn ouzomp ar pemped gourc'hemenn a Zoue ?

R. Ar pemped gourc'hemenn a Zoue ne zifenn ket ouzomp hebken laza hon nesa, difenn a ra ouspenn skei ganthan, kaout kaz outhan, lavaret traou d'ezhan, ha kaout c'hoant da velet drouk oc'h erruout ganthan.

G. *Petra zifenn c'hoaz ar gourc'hemenn-ze ?*

R. Ar gourc'hemenn-ze a zifenn c'hoaz noazout da ene ann nesa dre ar skouer fall.

G. *Petra eo rei skouer fall ?*

R. Rei skouer fall a zo ober pe lavaret eunn dra bennag hag a c'hell dougen ann nesa da offansi Doue.

G. *Petra zifenn ouzomp erfin ar pemped gourc'hemenn a Zoue ?*

R. Ar pemped gourc'hemenn a Zoue a zifenn ouzomp erfin en em laza hon-unan.

G. *Ha pec'hed braz eo en em ganna e duel, da lavaret eo unan oc'h unan ha dirak testou, a den-nou pistolenn pe a daoliou kleze ?*

R. Ia, ann dra-ze a zo pec'hed braz.

G. *Ann nep en deuz noazet d'ann nesa enn he gorf pe enn he ene, petra rank da ober ?*

R. Red eo d'ezhann goulenn pardoun digant Doue, ha rapari, hervez he c'halloud, ann drouk en deuz great.

EIL GENTEL VAR'NN UGENT

C HOUEC'HVED HA NAVED GOURC'HEMENN DOUE

Lubrik ne vezi ket ivez,
Nag a gorf nag a volonteiz.
Na c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag e sonj vil n'en em lezi.

G. *Petra zifenn ouzomp ann daou c'hourc'hemenn-ze ?*

R. Ann daou c'hourc'hemenn-ze a zifenn ouzomp : da genta, ober pe kaout c'hoant da ober traou dizhonest ; d'ann eil, sonjal er seurt traou-

ze, komz anezho pe zellet outho, ha d'ann trede, kement tra a zoug d'ar pec'hed vil.

G. *Ar c'hoant hag ar zonz hag hia zo ato pec'hed ?*

R. Nann, ar c'hoant hag ar zonz ne d'int pec'hed nemed pa ro ar volonteiz he asant d'ezhho.

G. *Pere eo ann traou a zoug d'ar pec'hed vil ?*

R. Ann traou a zoug d'ar pec'hed vil eo ar goall goupagnuneziou, ann dansou, ann ebatou noz, ar vezventi, ar guiskamanchou divodest hag al levriou fall.

G. *Petra denn ar pec'hed vil d'he heul ?*

R. Ar pec'hed vil a ra d'ann den ankounac'haat Doue, lakaat a ra he spered da veza dall hag he galoun d'en em galedi, ha kaoz a vez d'ezhann da goll ar feiz hag aliez da goll ar iec'hed.

G. *Petra ranker da ober evit en em viret pe en em zivoaza dioc'h ar pec'hed-se ?*

R. Evit en em viret pe en em zivoaza dioc'h ar pec'hed-se, e ranker beza aketuz d'ar bedenn, tec'het dioc'h ar goall goupagnuneziou, sonjal e finveziou diveza ann den, mont aliez da govez ha da gommunia, ha beza devot d'ar Verc'hez.

TREDE KENTEL VAR'NN UGENT

SEIZVED HA DEKVED GOURC'HEMENN DOUE

Laerez na mairt madou den
Gant gouiziegez ne ri biken.
Na zouhet madou da hentez
Evit ho c'haout dre falsentez.

G. *Petra zifenn ouzomp ann daou c'hourc'hemenn-ze ?*

R. Ar seizved hag ann dekved gourc'hemenn a

Zoue a zifenn ouzomp ober gaou ouz ann nesa enn he vadou, ha zoken kaout c'hoant da ober.

G. *Penaoz e reer gaou ouz ann nesa enn he vadou?*

R. E teir feson : da genta, o kemeret he dra a enep peb guir ; d'ann eil, oc'h he zalc'her enn despet d'ezhan, ha d'ann trede, o veza kaoz d'ezhan da gaout koll.

G. *Ar re o deuz great gaou ouz ann nesa enn he vadou, petra zo red d'ezho da ober?*

R. Red eo d'ezho restaol ar pezh o deuz kemeret pe zalc'het a enep peb guir, ha rapari ar c'holl a zo erruet dre ho faot.

G. *Da biou e tleont-hi restaol?*

R. Dann hini m'o deuz great gaou outhan pe d'he heritourien.

PEDERVED KENTEL VAR'NN UGENT

EIZVED GOURC'HEMENN DOUE

A enep den fals testeni
Na gaou ebet ne liviri.

G. *Petra zifenn ouzomp ann eizved gourc'henn a Zoue?*

R. Ann eizved gourc'henn a Zoue a zifenn ouzomp pemp tra : rei testeni faoz, lavaret gevier, drouk-prezeg, tamall e gaou ha drouk-sonjal.

G. *Petra eo rei testeni faoz?*

R. Rei testeni faoz a zo dougen testeni dirag ar barnar e enep ar virionez.

G. *Petra eo lavaret gevier?*

R. Lavaret gevier a zo lavaret ar c'hountrol euz ar pezh a zonjer, evit troumpla ar re all.

G. *Ha pec'hed eo ato lavaret gevier?*

R. Ia, pec'hed eo ato lavaret gevier, ha p'ho lavaret zoken evit ober vad pe evit en em ziouall dioc'h drouk

G. *Petra eo drouk-prezeg?*

R. Drouk-prezeg a zo dizelei d'ar re all, heb ma ve ezomm, faotou pe defaotou ann nesa.

G. *Petra eo tamall e gaou?*

R. Tamall e gaou a zo tamall d'ann nesa eur faot ha n'en deuz ket great, pe eunn defaot ha n'en deuz ket.

G. *Petra eo drouk-sonjal?*

R. Drouk-sonjal a zo kredi re vuhan en deuz great ann nesa eunn drouk bennag.

G. *Ar re o deuz noazet da vrud vad ann nesa, petra zo red d'ezho da ober?*

R. Red eo d'ezho rapari, hervez ho galloud, ar gaou o deuz great.

PEMPED KENTEL VAR'NN UGENT

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ

G. *Jezuz-Krist hag hen en deuz roet d'ann Iliz ar c'halloud da ober gourc'hemennoù?*

R. Ia, Jezuz-Krist en deuz roet d'ann Iliz ar c'halloud da ober gourc'hemennoù, ha chom heb senti oc'h ann Iliz a zo mankout da zenti oc'h Jezuz-Krist he unan.

G. *Livirit gourc'hemennoù ann Iliz.*

- R. 3. Ar goueliou berz a zantifi,
Neuze peb labour a lezi.
2. Ha kleo devot a benn-da-benn,
Sul ha gouel berz, ann offerenn.
3. Eur vech er bloaz, da vihana,
E kovesai heb nac'h netra.
4. Ha da Grouer a resevi,
Da Bask devota ma c'helli.
5. Iun a ri ann Daouzek-Deiziou,
Ar C'horaiz hag ar Vijilou.
6. Kig, nemed da zeiz Nedelek,
Guener ha Sadorn ne zebr ket.

G. *Petra ordren d'eomp ar c'henta gourc'hemenn euz ann Iliz ?*

R. Ar c'henta gourc'hemenn euz ann Iliz a ordren d'eomp santifia ar goueliou berz evel ar zul.

G. *Ped gouel berz a zo e Frans ?*

R. E Frans ez euz pevar gouel berz : gouel Nedelek, ar laou-Bask, gouel Maria-Hanter-Eost ha gouel ann Holl-Zent.

G. *Petra ordren d'eomp ann eil gourc'hemenn euz ann Iliz ?*

R. Ann eil gourc'hemenn euz ann Iliz a ordren d'eomp klevet ann offerenn da zul ha d'ar goueliou berz.

G. *Petra ordren d'eomp ann trede gourc'hemenn euz ann Iliz ?*

R. Ann trede gourc'hemenn euz ann Iliz a ordren d'eomp kovez hor pec'hejou, enn doare ma'z eo dleet, da vihana eur vech er bloaz.

G. *Perak e livirit-hu : da vihana eur vech er bloaz ?*

R. Abalamour ar re a zo e guirionez c'hoantek da ober ho zilvidigez a ia da govez aliesoc'h.

G. *Da be oad e tleer kas ar vugale da govez ?*

R. Kerkent ha m'int goest da offansi Doue, da lavaret eo, var dro seiz vloaz.

G. *Petra ordren d'eomp ar pevare gourc'hemenn euz ann Iliz ?*

R. Ar pevare gourc'hemenn euz ann Iliz a ordren d'ann holl dud fidel, a zo enn oad da c'hout mad petra reont, kommunia enn doare ma'z eo dleet, da nebeuta da Bask bep bloaz.

G. *E pe leac'h e tleer kommunia da Bask ?*

R. Peb hini a dle kommunia da Bask enn he iliz parrez, nemet kounje en defe bet da gommunia e leac'h all digant ann Aotrou'n Eskop pe digant he bersoun.

G. *Petra ordren d'eomp ar pemped gourc'hemenn euz ann Iliz ?*

R. Ar pemped gourc'hemenn euz ann Iliz a ordren d'eomp iun epad ar C'horaiz, d'ann Daouzek-Deiziou pe d'ar C'hotuerou, ha dere'hent lod euz ar goueliou braz.

G. *Piou eo ann dud a zo dleet d'ezho iun ?*

R. Ann dud a zo dleet d'ezho iun eo ar re o deuz eur bloaz var'n'n ugent achu, nemed ar gozni, pe ar c'hlenved, pe ho labouriou tenn a virfe outho.

G. *Petra zifenn ouzomp ar c'houec'hved gourc'hemenn euz ann Iliz ?*

R. Ar c'houec'hved gourc'hemenn euz ann Iliz a zifenn ouzomp dibri kig da Vener ha da Zadorn, heb ezomm hag heb dispans.

G. *Perak ec'h ordren ann Iliz iun hag ober vijil ?*

R. Ann Iliz a ordren iun hag ober vijil evit hor zikour da ober pinijenn, ha da drec'hi hor goall ioulou.

C'HOUEC'HVED KENTEL VAR'NN UGENT

AR PEC'HED

G. *Petra eo ar pec'hed ?*

R. Ar pec'hed a zo cunn dizentidigez oc'h lezenn Doue.

G. *Ped seurt pec'hejou a zo ?*

R. Daou seurt pec'hejou a zo : ar pec'hed orijinel hag ar pec'hed aktuel.

G. *Petra eo ar pec'hed orijinel ?*

R. Ar pec'hed orijinel eo ann hini a zeu ganeomp var ann douar, abalamour ma hon euz bet holl perz e dizentidigez hon tad kenta Adam.

G. *Petra eo ar pec'hed aktuel ?*

R. Ar pec'hed aktuel eo ann hini a reomp dre hor bolontez hon-unan, goude m'oump deuet da gaout skiant.

G. *Ped seurt pec'hejou aktuel a zo ?*

R. Daou seurt pec'hejou aktuel a zo : ar pec'hed marvel hag ar pec'hed veniel.

G. *Petra eo pec'hi marvelamant ?*

R. Pec'hi marvelamant a zo mankout da lezenn Doue enn eur poent grevuz gant eur vouiziegez hag eur volonteiz parfet.

G. *Petra deu da heul ar pec'hed marvel ?*

R. Ar pec'hed marvel a ro ar maro d'hon ene oc'h ober d'ezhan koll gras Doue, hag hon laka var hent ann ifern.

G. *Petra eo pec'hi venielamant hebken ?*

R. Pec'hi venielamant hebken a zo mankout da lezenn Doue enn eur poent dister, pe mankout enn eur poent grevuz heb gouzout ervad petra reer, pe heb rei he holl asant d'ar pec'hed.

G. *Petra deu da heul ar pec'hed veniel ?*

R. Ar pec'hed veniel a laka karantez Doue da zemplaat ennomp, a zigor hent d'ar pec'hed marvel, hag a ra d'eomp meritout poaniou temporel pe boaniou ha ne badint ket ato.

G. *E ped feson e c'heller offansi ann Aotrou Doue ?*

R. Offansi a c'heller ann Aotrou Doue e pemp feson : dre zonj, dre c'hoant, dre gomz, dre ober ha dre vankout da ober.

G. *Petra zo red evit en em ziuall dioc'h ar pec'hed ?*

R. Red eo sonjal enn hor finvezioù diveza, beza aketuz d'ar bedenn, beilla varnomp hon-unan ha tostaat aliez ouz ar zakramanchou.

SEIZVED KENTEL VAR'NN UGENT

AR PEC'HEJOU KAPITAL

G. *Petra eo ar pec'hejou kapital ?*

R. Ar re a zo evel ar zoursenn euz ann holl bec'hejou all.

G. *Ped pec'hed kapital zo ?*

R. Bez' ez euz seiz : ann ourgouill, ann avarised, al luksur, ann avi, ar gourmandiz, ar vuhanegez hag ann diegi.

G. *Petra eo ann ourgouill ?*

R. Ann ourgouill a zo eur garantez direiz er deuz ann den evithan he-unan, hag a ra d'ezhan en em istimout dreist ar re-all ha klask en em zével hueloc'h egetho.

G. *Petra eo ann avarised?*

R. Ann avarised a zo eur garantez direiz evit madou ar bed, ha dreist holl evit ann arc'hant.

G. *Petra eo al luksur?*

R. Al luksur eo ar pec'hed vil a zo difennet dre ar c'houec'hved hag ann naved gourc'hemenn a Zoue.

G. *Petra eo ann avi?*

R. Ann avi a zo eunn displijadur a ra d'eomp ar vad a erru gant hon nesa, pe ar joa on euz o velet drouk oc'h erruout ganthan.

G. *Petra eo ar gourmandiz?*

R. Ar gourmandiz a zo eur garantez direiz evit ann dibri hag ann eva.

G. *Pehini eo ann danjerusa euz ar pec'hejou a c'hourmandiz?*

R. Ann danjerusa euz ar pec'hejou a c'hourmandiz eo ar vezventi a laka ann den da goll he skiant, a ziskar ann tiegeziou, hag a denn d'he heul ar brasa dizurziou.

G. *Petra eo ar vuhanegrez pe ar goler?*

R. Ar vuhanegrez pe ar goler a zo eur froudenn direiz euz hon ene hag a ra d'eomp mont enn egar oc'h kement tra a zisplij d'eomp, ha klask en em venji.

G. *Petra eo ann diegi?*

R. Ann diegi a zo eul leziregez hag a ra d'eomp lezel hon dever da ober kent eget en em zieza hon-unan ann distera.

G. *Piou a zo ho c'houstians neat dioc'n ar pe-c'hejou kapital?*

R. Ar re o deuz eur galoun humbl ha distag dioc'h madou ann douar, a zo chast ha karantezuz, a ziuall da zibri ha da eva re, a c'houzanv gant pasianted ar pezh a zisplij d'ezho, hag a zo bepred aketuz d'ho dever ha d'al labour.

TREDE LODENN

DIVARBENN ANN TRAOU A RO SIKOUR D'EOMP
D'EN EM ZANTIFIA

EIZVED KENTEL VAR'NN UGENT

AR C'HRAS

G. *Ha ni a c'hell dre hon nerz hon-unan miret gourc'hemennou Doue ha re ann Iliz, hag en em ziuall dioc'h ar pec'hed?*

R. Nann, ezomm on euz evit ann dra-ze euz a c'hras ann Aotrou Doue.

G. *Petra eo ar c'hras?*

R. Ar c'hras a zo eunn donezoun dreist natur a ro Doue d'eomp enn he vadelez hag er guel a veritou Jezuz-Krist, evit hor sikour d'en em zavetei.

G. *Ped seurt grasou a zo?*

R. Daou seurt grasou a zo : ar c'hras a ro ar zantelez hag ar c'hras a ro sikour.

G. *Petra eo ar c'hras a ro ar zantelez ?*

R. Ar c'hras a ro ar zantelez a zo eur c'hras a jom enn hon ene hag a ra d'eomp beza just ha santel dirak Doue ; setu ar pezh a hanver ar stad a c'hras.

G. *Ha ni a c'hell mont d'ar baradoz heb ar c'hras a ro ar zantelez ?*

R. Nann, p'e guir e ranker mervel e stad a c'hras evit mont di.

G. *Petra eo hon oberiou heb ar stad a c'hras ?*

R. Oberiou ha n'euz rekoumpans ebet da gaout evitho er baradoz.

G. *Penaoz e koller ar stad a c'hras ?*

R. Dre ar pec'hed marvel.

G. *Petra eo ar c'hras a ro sikour ?*

R. Ar c'hras a ro sikour a zo eur sklerijenn a ro Doue d'hor spered, pe eunn taolik skoaz a ro d'hor bolontez evit hor zikour da ober ar mad ha d'en em ziuall dioc'h ann drouk.

G. *Ouspenn beza e stad a c'hras, hag ezomm on euz-ni c'hoaz euz ar c'hras a ro sikour ?*

R. Ia, heb ar c'hras a ro sikour ne c'hellomp ober netra hag a ve talvouduz evit hor zilvidigez.

G. *Doue hag hen a ro ar c'hras-ze d'ann dud holl ?*

R. Ia, Doue a ro ar c'hras-ze d'ann dud holl, ha zoken d'ar brasa pec'herien ; n'en em goller nemed abalamour ma reer fae varnhi.

G. *Penaoz e teu gras Doue d'eomp peurvuia ?*

R. Gras Doue a zeu d'eomp peurvuia dre ar bedenn ha dre ar zakramanchou.

NAVED KENTEL VAR'NN UGENT

AR BEDENN

G. *Petra eo pedi ?*

R. Pedi a zo sevel hor spered hag hor c'haloun varzu Doue evit he adori ha goulenn diganthan he c'hrasou.

G. *Ha red eo pedi ?*

R. Ia, abalamour Doue her gourc'hemenn d'eomp, ha m'on euz bepred ezomm euz he c'hras.

G. *Peur, dreist-holl, e tleomp-ni pedi ?*

R. Pedi a dleomp dreist holl dioc'h ar mintin ha dioc'h ann noz, ha pa vezomp tentet pe enn eunn danjer bennag.

G. *Petra dleer da zontal euz ar re a vank aliez d'ho fedennou dioc'h ar mintin ha dioc'h ann noz ?*

R. Sonjal a dleer e risklont ho zilvidigez.

G. *Penaoz e ranker pedi ?*

R. Red eo pedi gant evez, gant humilite, gant fizians hag heb paqueuz, ha pedi enn hano Jezuz-Krist, rak dre Jezuz-Krist hebken e veritomp beza selaouet.

G. *Petra dleomp-ni da c'houlenn digant Doue ?*

R. Goulenn a dleomp digant Doue ar pezh a zo guella evit he c'hoar, evit hor zilvidigez ha silvidigez ann nesa.

G. *Ha goulenn a c'hellomp-ni ive madou ar bed-ma ?*

R. Ia, gant ma livirimp ato e goeled hor c'haloun : Bolontez Doue bezet great !

G. *Evit piou e tleomp-ni pedi ?*

R. Pedi a dleomp n'e ket hebken evidomp hon-unan, mes c'hoaz evit ann Iliz, evit hor c'herent, hor zuperioired, hor mignouned hag hon enebourien, evit distro ar becherien ouz Doue hag evit anaoun ar purkator.

TREGONTVED KENTEL

AR *Bater* HAG ANN *Ave*

G. *Pehini eo ar vella euz ann holl bedennou ?*

R. Ar vella euz ann holl bedennou eo pedenn hor Zalver, pe ar *Bater*, a zo bet desket d'eomp gant Jezuz-Krist he-unan.

G. *Livirit ar bedenn-ze e latin.*

R. Pater noster, qui es in cœlis, sanctificetur nomen tuum; adveniat regnum tuum; fiat voluntas tua sicut in cœlo et in terrâ. Panem nostrum quotidianum da nobis hodiè, et dimitte nobis debita nostra, sicut et nos dimittimus debitoribus nostris, et ne nos inducas in tentationem; sed libera nos à malo. Amen.

G. *Livirit-hi e brezhonek.*

R. Hon Tad, pehini zo enn env, hoc'h hano bezet santifiet; ho rouantelez deuet deomp; ho polontez bezet great var ann douar evel enn env. Roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek, ha pardounit d'eomp hon offansou evel ma pardounomp d'ar re o deuz hon offanset; ha na bermettit ket e kouezfempe tentasion; mez hon dilivrit diouz ann drouk. Evelse bezet great.

G. *Perak e livirit-hu d'ann Aotrou Doue : Hon Tad ?*

R. Abalamour ma'z oump holl he vugale, ha ma tleomp kaout ennhan ar fizians en deuz eur c'hrouadur enn he dad.

G. *Perak e livirit-hu : Hon Tad ha nann Va Zad ?*

R. Abalamour ma tleomp pedi ann eil evit egile evel bugale da eur memes tad.

G. *Perak e livirit-hu : Hon Tad, pehini zo enn env ?*

R. Abalamour enn env eo ec'h en em ziskouez Doue enn he c'hloar, ha ma'z eo d'ann env e tleomp beza kaset dre ar bedenn.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa levramp : Hoc'h hano bezet santifiet ?*

R. Goulenn a reomp ma vezo Doue anavezet, kareth ha servichet gant ann holl dud, ha ganeomp-ni da gata.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa levramp : Ho rouantelez deuet d'eomp ?*

R. Goulenn a reomp ma reno Doue enn hor c'halounou dre he c'hras, ha ma raio d'eomp ren ganthan eunn deiz enn he varadoz.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa levramp : Ho polontez bezet great var ann douar evel enn env ?*

R. Goulenn a reomp ma rai ann dud bolontez Doue var ann douar evel m'he gra ann elez hag ar zent er baradoz.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa levramp : Roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek ?*

R. Goulenn a reomp ar pezh a zo red bemdez evit mezur hor c'horf hag hon ene.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa leveromp* : Ha pardounit d'eomp hon offansou evel ma pardounomp d'ar re o deuz hon offanset ?

R. Goulenn a reomp ma pardouno Doue d'eomp hor pec'hejou evel ma pardounomp hon-unan d'hon-nesa pa en deuz hon offanset.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa leveromp* : Ha na bermettit ket e kouezfemp e tentasion ?

R. Goulenn a reomp digant Doue ar c'hras ne vezimp ket tentet, pe ar c'hras da veza treac'h d'ann dentasion, mar fell da Zoue e vemp tentet.

G. *Petra c'houlennomp-ni digant Doue pa leveromp* : Hon dilivrit diouz ann drouk ?

R. Goulenn a reomp ar c'hras da veza diouallet diouz peb drouk, ha dreist peb tra diouz ar pec'hed.

G. *Petra ziniñ ar c'homzou-ma* : Evel-se bezet great ?

R. Ar c'homzou-ze a goupren hon holl goulennou e tri ger, hag a ziskouez ar c'hoant on euz da veza selaouet.

G. *Pehini eo ann ordinala pedenn a ra ar gristenien fidel goude ar Bater* ?

R. Ann ordinala pedenn a ra ar gristenien fidel goude ar *Bater*, eo ann *Ave Maria* pe zalud ann eal, hag a zo great gant komzou ann ar-c'heal Gabriel, komzou santez Elisabeth ha re ann Iliz.

G. *Livirit ar bedenn-ze e latin*.

R. Ave, Maria, gratiā plena, Dominus tecum, benedicta tu in mulieribus et benedictus fructus ventris tui, Jesus. Sancta Maria, mater Dei, ora pro

nobis peccatoribus, nunc et in horā mortis nostrae. Amen.

G. *Livirit-hi e brezounek*.

R. Me ho salud, Mari, leun a c'hras, ann Aotrou Doue a zo ganeoc'h, benniget oc'h dreist ann holl gragez, ha benniget eo ar frouez euz ho korf, Jezuz. Santez Mari, mamm da Zoue, pedit evidomp pec'herien, brema hag enn heur euz hor maro. Evelse bezet great.

G. *Perañ e livirit-hu ann Ave Maria* ?

R. Lavaret a reomp ann *Ave Maria*, evit honori ar Verc'hez evel mamm da Zoue, hag evit otten dreizhi ar grasou m'on euz ezomm anezho, ha dreist holl ar c'hras da gaout eur maro mad.

G. *Pere eo ar pedennou all a reer aliesia enn honer d'ar Verc'hez* ?

R. Ar pedennou all-ze eo ann *Angelus*, ar *ro-zera*, ar chapelad hag al litanieu.

KENTA KENTEL HA TREGONT

AR ZAKRAMANCHOU

G. *Petra eo eur zakramant* ?

R. Eur zakramant a zo eur sin sklear hag anat euz a c'hras Doue, instituet gant Jezuz-Krist evit hor zantifia.

G. *Perañ e livirit-hu eo eur zakramant eur sin sklear hag anat euz a c'hras Doue* ?

R. Abalamour ar pezh a velomp hag ar pezh a glevomp enn eur zakramant a verk d'eomp euz gras Doue o tont enn ene dre ar zakramant-ze.

G. *Penaoz e teu ar zakramanchou d'hor zantifia?*

R. Oc'h ober d'eomp kaout perz e meritou Jezuz-Krist.

G. *Ar zakramanchou hag hi hor zantifi holl er memes feson?*

R. Nann, lod anezho a ro d'eomp buez ar c'hras, ha lod all he c'hresk ennomp.

G. *Ped sakramant zo?*

R. Beza zo seiz sakramant : ar Vadiziant, ar Gonfirmasion, sakramant ann Aoter, ar Binijenn, ann Nouenn, ann Urs hag ar Briedelez.

G. *Ha bez' ez euz sakramanchou ha ne c'heller ho reseo nemed eur vech?*

R. Ia, ne c'heller reseo nemed eur vech ar Vadiziant, ar Gonfirmasion hag ann Urs.

G. *Perak ne c'heller reseo ar zakramanchou-ze nemed eur vech?*

R. Abalamour ma lakeont enn ene eur merk hag a jom ato, hag ar merk-se a hanver *karakter*.

G. *Hag eur pec'hed braz eo reseo ar zakramanchou heb beza e stad da dostaat outho?*

R. Ia, ann dra-ze a zo eur sakrilach, da lavaret eo, eur goall implij euz a eunn dra sakr.

EIL GENTEL HA TREGONT

AR VADIZIANT

G. *Petra eo ar Vadiziant?*

R. Ar Vadiziant a zo eur zakramant a neta ann

ene dioc'h ar pec'hed orijinel, hag hor gra kristenien ha bugale da Zoue ha d'ann Iliz.

G. *Ar Vadiziant hag hi a neta ive ann ene dioc'h ar pec'hejou aktuel?*

R. Ia, ar Vadiziant a neta ive ann ene dioc'h ar pec'hejou aktuel a ve bet great araok he reseo, hag a ro ar pardoun euz ar poaniou dleet d'ar pec'hejou-ze.

G. *Ha red eo beza badezet evit mont d'ar baradoz?*

R. Ia, ar vugale n'int ket bet badezet ne deont ket d'ar baradoz.

G. *Pa ne c'heller ket beza badezet, hag hen a c'hell eunn dra bennag all servichout da Vadiziant?*

R. Ia, ar verzerenti, pe eunn akt a garantez parfet gant ar c'hoant da veza badezet a c'hell servichout da Vadiziant, pa ne c'heller ket reseo ar zakramant.

G. *Piou a c'hell badezi?*

R. N'euz fors piou a c'hell badezi pa vez red ; mes, nemed oc'h red, ar Vadiziant a dle beza roet gant eur belek.

G. *Petra ranker da ober evit rei mad ar Vadiziant?*

R. Evit rei mad ar Vadiziant e ranker skuill dour naturel var benn ann hini a vadezer, hag ann hini a skuill ann dour a dle lavaret er memes amzer : Me ho padez enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.

G. *Var behini euz ar memprou e ranker skuill ann dour evit badezi?*

R. Red eo skuill ann dour var ar penn, pe, ma ne c'heller ket, var unan euz ar brasa memprou.

G. *Pehini eo hon dever-ni evel tud badezet ?*

R. Hon dever, evel tud badezet, eo heul a boent da boent relijion Jezuz-Krist.

G. *Da betra e troomp-ni kein dre ar Vadiziant ?*

R. Dre ar Vadiziant e troomp kein da Zatan, d'he bompou ha d'he oberiou.

G. *Pere eo deveriou ar paeroun hag ar vaerou-nez ?*

R. Red eo d'ezho kemeret soursi euz a zilvidigez ar c'hrouadur pa vank ann tad hag ar vamm, ha teuler evez ma vezo roet d'ezhan eur gelennadurez kristen.

TREDE KENTEL HA TREGONT

AR GONFIRMASION

G. *Petra eo ar Gonfirmasion ?*

R. Ar Gonfirmasion a zo eur zakramant hag a ro d'eomp ar Spered-Santel gant he zeiz donezoun, evit ober kristenien barfet ac'hanomp.

G. *Penaoz e teu ar Gonfirmasion da ober kristenien barfet ac'hanomp ?*

R. O krenvaat ennomp gras hor Badiziant, hag o rei d'eomp nerz da anzañ hor feiz e riskl hor buez zoken.

G. *Ha red eo beza konfirmet evit mont d'ar baradoz ?*

R. Nann, n'e ket red beza konfirmet evit mont d'ar baradoz, evel ma'z eo red beza badezet : pe c'hed e ve goulskoude mankout da reseo ar zakramant-ma dre leziregezh, pe abalamour ma reer fad varn'han.

G. *E pe stad e ranker beza evit reseo sakramant ar Gonfirmasion ?*

R. Red eo beza e stad a c'hras, ha gouzout mad he Gatekiz.

G. *Piou en deuz ar c'halloud da rei sakramant ar Gonfirmasion ?*

R. Ann Aotrou'n Eskop.

G. *Petra a ra ann Aotrou'n Eskop pa ro ar Gonfirmasion ?*

R. Da genta, ec'h astenn he zaouarn var ar re a dle beza konfirmet, ha goudeze e ra sin ar groaz var ho zal gant ann oleo sakr hag e ro d'ezho eur fasadik.

G. *Perak e ra ann Aotrou'n Eskop sin ar groaz var dal ar re a vez konfirmet ?*

R. Evit deski d'ezho ne dleont ket kaout mez oc'h anzañ feiz Jezuz Krist.

G. *Perak e ro ann Aotrou'n Eskop eur fasadik d'ar re a vez konfirmet ?*

R. Evit deski d'ezho e tleont beza prest da c'houlzanv a bep seurt dismegans hag a bep seurt goaperez dre garantez evit Jezuz-Krist.

PEDERVED KENTEL HA TREGONT

SAKRAMANT ANN AOTER

G. *Petra eo sakramant ann Aoter ?*

R. Eur sakramant eo hag a zo ennhan e guirio-
pezh korf, goad, ene ha divinite hor Zalver Jezuz-Krist dindan spesou ar bara hag ar guin.

G. *Korf Jezuz-Krist e sakramant ann Aoter hag*

hen a zo ar memes korf m'en doa var ann douar ha m'en deuz breman enn env?

R. Ia, ar memes korf eo m'en doa var ann douar ha m'en deuz brema enn env.

G. *Petra ententit-hu dre spesou ar bara hag ar guin?*

R. Me a entent ar pezh a velomp pe a zantomp gant hor skianchou, evel ma'z eo furm, liou ha blaz ar bara hag ar guin.

G. *Ar bara hag ar guin hag hi a jom dindan ar spesou-ze?*

R. Nann, dindan ar spesou-ze n'ez euz mui na bara na guin; chenchet int e korf hag e goad Jezuz-Krist.

G. *Penaoz e vez great ar jenchamant-ze?*

R. Ar jenchamant-ze a vez great dre ar c'homzou a lavar ar belek enn offerenn da vare ar goureou.

G. *Jezuz-Krist hag hen a zo holl dindan spes ar bara, hag holl dindan spes ar guin?*

R. Ia, Jezuz-Krist a zo holl dindan peb hini euz ar spesou, hag holl dindan peb lodenn euz ar spesou.

G. *Perak ann dra-ze?*

R. Abalamour Jezuz-Krist a zo eno leun a vuez, hag evelse he gorf, he c'hoad, he ene hag he zivinite ne c'hellont ket beza dispartiet.

G. *Perak en deuz Jezuz-Krist instituet sakramant ann Aoter?*

R. Evit chom ganeomp enn tabernakl, servichout da vagadurez d'hon eneou, hag en em ginig e sakrifis da Zoue he Dad.

G. *Petra c'houlenn Jezuz-Krist diganeomp enn eur jom enn tabernakl?*

R. Enn eur jom enn tabernakl, Jezuz-Krist a c'houlenn diganeomp hon respet, hon adoration, hon anaoudegez vad hag hor c'harantez.

PEMPED KENTEL HA TREGONT

AR GOMMUNION

G. *Penaoz e servich Jezuz-Krist da vagadurez d'hon eneou e sakramant ann Aoter?*

R. Jezuz-Krist a zervich da vagadurez d'hon eneou dre ar gommunion.

G. *Petra eo kommunia?*

R. Kommunia a zo reseo korf, goad, ene ha divinite hor Zalver Jezuz-Krist dindan spesou ar bara.

G. *Ha red eo kommunia?*

R. Ia, red eo kommunia da nebeuta eur vech er bloaz da Bask, ha pa vezer e danjer a varo.

G. *Mad eo kommunia aliez?*

R. Ia, gant ma vezo ann ene e stad vad, ha ma vo ar c'honfesour aviz euz ann dra-ze.

G. *E pe stad e ranker beza evit kommunia ervad?*

R. Evit kommunia ervad ez euz eur stad hag a zell ouz ar c'horf, hag eur stad all hag a zell ouz ann ene.

G. *E pe stad e tle beza ar c'horf?*

R. Ar c'horf a dle beza var iun, da lavaret eo, heb beza na debret nag evet netra abaoue han-

ter-noz ; red eo, ouspenn, e ve guisket deread ha modest enn he zoare.

G. *Ha kommunia a c'heller avechou heb beza var iun ?*

R. Ia, pa vezer goall glanv ; setu ar pecz a hanver kommunia e *viatik* ?

G. *E pe stad e tle beza ann ene ?*

R. Evit ar pecz a zell ouz ann ene, ann nep a ia da gommunia a dle anaout mad he relijion, beza neat a bec'hed marvel, ha tostaat ouz ann daol zantel gant feiz, humilite ha karantez.

G. *Hag eur pec'hed braz eo kommunia e stad a bec'hed marvel ?*

R. Ia, kommunia e stad a bec'hed marvel a zo ne-vezi pec'hed Judaz, hag ober eur sakrilach skrijuz.

G. *Petra ranker da ober goude ar gommunion ?*

R. Red eo chom eur pennad enn iliz da adori Jezuz-Krist, d'he drugarekaat ha da c'houlenn diganthan he c'hrasou.

G. *Pe seurt frouez a zoug eur gommunion vad ?*

R. Da genta, dre eur gommunion vad Jezuz-Krist ha ni ne reomp mui nemed unan ; d'ann eil, eur gommunion vad a gresk ennomp buez ar c'hras, a dorr nerz hon techou fall, hag a zo evidomp eunn errez euz ar rezurreksion gloriuz.

C'HOUEC'HVED KENTEL HA TREGONT

ANN OFFERENN

G. *Petra eo ann offerenn ?*

R. Ann offerenn a zo eur sakrifis, hag er sakri-

fis-se Jezuz-Krist a ginnig evidomp da Zoue, dre zaouarn ar belek, he gorf hag he c'hoad dindan spesou ar bara hag ar guin.

G. *Perak en deuz Jezuz-Krist instituet sakrifis ann offeren ?*

R. Evit digas da zonj d'eomp euz a zakrifis ar Groaz, he nevezi bepred, hag ober d'eomp kaout perz enn he veritou.

G. *Sakrifis ann offerenn hag hen a zo ar memes sakrifis hag hini ar Groaz ?*

R. Ia, rak ar memes Jezuz-Krist eo en em ginnig evidomp da Zoue, petra bennag n'en em ginnig ket er memes feson.

G. *Ha kinnig a c'heller sakrifis ann offerenn d'ar Verc'hez ha d'ar Zent ?*

R. Nann, ne ginniger sakrifis ann offerenn nemed da Zoue hebken.

G. *Perak e reer enn offerenn memor euz ar Verc'hez hag euz ar Zent ?*

R. Evit trugarekaat Doue abalamour d'ar grasou en deuz roet d'ezho, hag evit ma plijo gantho pedi Doue evidomp asamblez ganeomp.

G. *Evit piou e kinniger sakrifis ann offerenn ?*

R. Evit ar re veo, hag evit anaoun ar purkator.

G. *Petra dleomp-ni da ober epad ann offerenn ?*

R. Epad ann offerenn e tleomp adori Doue, he drugarekaat evit he vadoberiou, ha goulenn diganthan ar pardoun euz hor pec'hejou, hag ar grasou m'on euz ezomm anezho.

G. *Petra c'hellomp-ni da ober c'hoaz ?*

R. Epad ann offerenn e c'hellomp c'hoaz sonjal.

e passion hag e maro Jezuz-Krist, oc'h en em zelaer eharz ann aoter egiz pa vemp e tal ar Groaz.

SEIZVED KENTEL HA TREGONT

SAKRAMANT AR BINIJENN

G. *Petra eo ar Binijenn ?*

R. Ar Binijenn a zo eur zakramant hag a ro d'eomp ar pardoun euz ar pec'hejou a vez great goude ar Vadiziant.

G. *Ha red eo reseo sakramant ar Binijenn evit beza salvet ?*

R. Ia, kement hini en deuz great eur pec'hed marvel bennag abaoe he Vadiziant, a rank reseo sakramant ar Binijenn evit beza salvet.

G. *Peur e resever sakramant ar Binijenn ?*

R. Pa resever ann absolvenn.

G. *Petra eo ann absolvenn ?*

R. Ann absolvenn eo ar zetans a zoug ar belek, enn hano Jezuz-Krist, evit rei ar pardoun euz he bec'hejou d'ar pec'her a zo er stad a ranker evit kement-se.

G. *Petra ra ann absolvenn ?*

R. Ann absolvenn a bardoun ar pec'hejou, n'euz fors peger grevuz e vent, hon laka adarre e gras Doue, hag a restaol d'eomp ar mirit euz ann obeirou mad hor boa great araok ar pec'hed.

G. *Petra rank ar pec'her da ober evit reseo ann absolvenn ?*

R. Red eo d'ezhan : da genta, kaout keuz d'he bec'hejou ; d'ann eil, ho c'hovez gant lealded, ha

d'ann trede, beza prest da rapari ann offans en deuz great da Zoue ha d'ann nesa.

G. *Penaoz e hanver ann tri zra-ze ?*

R. Ann tri zra-ze a hanver ar gontrision, ar gonfesion hag ar zatisfaksion.

EIZVED KENTEL HA TREGONT

AR GONTRISION

G. *Petra eo ar gontrision ?*

R. Ar gontrision a zo eur glac'har er galoun hag eur gasouni ouz ar pec'hejou on euz great, gant eur guir volontez d'en em viret diouz ar pec'hed enn amzer da zont.

G. *Peur e vez eur guir volontez d'en em viret diouz ar pec'hed enn amzer da zont ?*

R. Pa fell d'eomp a-grens chench buez hag en em ziousal dioc'h ar pec'hed ha dioc'h kement tra a zoug d'ar pec'hed.

G. *Ar gontrision hag hi a zo eunn dra red ?*

R. Ia, heb ar gontrision ne c'heller morse reseo ar pardoun euz ar pec'hejou.

G. *Penaoz e tle beza ar gontrision evit obten d'eomp digant Doue ar pardoun euz hor pec'hejou ?*

R. Ar gontrision a dle beza interior, souveren, universel ha dreist-naturel.

G. *Petra ententit-hu pa livirit e tle ar gontrision beza interior ?*

R. Pa lavarann e tle ar gontrision beza interior, me a entent n'e ket aoualc'h d'ar pec'her lavaret

en deuz keuz d'he bec'hejou, red eo d'ezhan ho c'hasaat e guirionez hag a greiz kaloun.

G. *Petra ententit-hu pa livirit e tle ar gontrision beza souveren ?*

R. Pa lavarann e tle ar gontrision beza *souveren*, me a entent e ranker kasaat ar pec'hed dreist peb drouk all, ha beza prest da vervel kent eged offansi Doue marvelamant.

G. *Petra ententit-hu pa livirit e tle ar gontrision beza universel ?*

R. Pa lavarann e tle ar gontrision beza *universel*, me a entent e tle en em astenn da vihana var ann holl bec'hejou marvel, heb ma chomfe nikun ha ne ve ket a geuz d'ezhan.

G. *Petra ententit-hu pa livirit e tle ar gontrision beza dreist-naturel ?*

R. Pa lavarann e tle ar gontrision beza *dreist-naturel*, me a entent ez eo eur c'hras a berz Doue, hag e tleer kaout keuz d'ar pec'hejou evit ar rezouniou a zesk d'eomp ar feiz.

G. *Petra ranker da ober evit kaout eur gontrision vad ?*

R. Red eo he goulenn digant Doue, ha sonjal er rezouniou a c'hell hor zikour d'he c'haout.

G. *Pere eo ar rezouniou-ze ?*

R. Setu hi ama : ar pec'hed a ra d'eomp koll ar baradoz ha meritout ann ifern ; kaoz eo bet da basion Jezuz-Krist, ha dreizhan ec'h offansomp eunn Doue ha n'euz fin ebed d'he vadelez.

G. *Ped seurt kontrision a zo ?*

R. Daou seurt kontrision a zo : ar gontrision barfet hag ar gontrision imparfet pe ann attrision.

G. *Petra eo ar gontrision barfet ?*

R. Ar gontrision barfet a zo eur c'hlaç'har da veza offanset Doue abalamour ma'z eo infinimant mad hag infinimant din da veza karet, ha ma tisplij d'ezhan ar pec'hed.

G. *Petra eo ar gontrision imparfet ?*

R. Ar gontrision imparfet a zo eur c'hlaç'har da veza offanset Doue abalamour dre hor pec'hejou on euz kollet ar baradoz ha meritet ann ifern.

G. *Pe seurt kemm a zo etre ar gontrision barfet hag ar gontrision imparfet ?*

R. Ar gontrision imparfet ne ro ket ar pardoun euz ar pec'hejou heb ann absolver, e leac'h ar gontrision barfet a laka ar pec'her da veza mignon da Zoue araok ann absolver, gant m'en devezo c'hoant d'he reseo.

G. *Ann nep a zo e stad a bec'hed marvel hag en em gav e danjer a varo heb gellout kovez, petra dle da ober ?*

R. Ann nep a zo e stad a bec'hed marvel hag en em gav e danjer a varo heb gellout kovez, a dle ober eunn akt a gontrision barfet, ha lavaret da Zoue ez ai da govez kenta ma c'hello.

G. *Grit eunn akt a gontrision.*

R. Va Doue, eur c'heuz braz am euz d'ho peza offanset, abalamour ma'z oc'h infinimant mad hag infinimant din da veza karet, ha ma tisplij d'oc'h ar pec'hed. Ho pedi a rann d'am pardouni dre veritou Jezuz-Krist, ha me lavar d'eoc'h euz a greiz va c'haloun n'hoc'h offansinn mui, gant sikour ho kras, hag e rinn pinijenn.

NAVED KENTEL HA TREGONT

AR GONFESION

G. *Petra eo kovez ar pec'hejou ?*

R. Kovez ar pec'hejou a zo ho diskleria da eur belek hag en deuz galloud da rei ann absolvenn, evit kaout pardoun anezho diganthan.

G. *Piou en deuz douget lezenn ar gonfesion ?*

R. Jezuz-Krist eo en deuz he douget, p'en deuz roet d'he ebestel ar c'halloud da bardouni ar pec'hejou pe da jom heb ho fardouni.

G. *Ha red eo kovez hon holl bec'hejou ?*

R. Ia, red eo da vihana kovez ann holl bec'hejou marvel.

G. *N'e ket red kovez ar pec'hejou veniel ?*

R. Nann, n'e ket red kovez ar pec'hejou veniel ; mes eunn dra vad ha talvouduz eo hen ober, hag ann absolvenn a resever euz ar pec'hejou-ze a gresk ennomp buez ar c'hras.

G. *Ha red eo diskleria ann niver euz ar pec'hejou ?*

R. Ia, red eo diskleria ann niver euz ar pec'hejou e kement ha ma c'heller kaout sonj anezhan.

G. *Diskleria e ranker ive ar pez a jench doare d'ar pec'hed, hag ar pez a ra d'ezhan beza grevusoc'h ?*

R. Ar pez a jench doare d'ar pec'hed a ranker da ziskleria, ha mad eo ive lavaret ar pez a ra d'ezhan beza grevusoc'h.

G. *Petra rank ar pec'her da ober abarz mont da govez ?*

R. Red eo d'ezhan sellet piz enn he goustians evit gullet penaoz en deuz offanset Doue abaoe he gonfesion diveza.

G. *E petra e tle-hen sonjal evit anaout mad he bec'hejou ?*

R. Red eo, d'ezhan sonjal e gourc'hemennou Doue ha re ann lliz, er seiz pec'hed kapital hag enn deveriou euz he stad.

G. *Ann nep a guzfe eur pec'hed marvel ouz he gonfesour a reseo a rafe ar pardoun euz he bec'hejou ?*

R. Nann, pec'hed ebed ne ve pardounet d'ezhan, hag ober a rafe eur sakrilach.

G. *Ann nep en defe great eunn hevelep sakrilach, petra ve red d'ezhan da ober ?*

R. Red e ve d'ezhan kovez ar sakrilach-se, hag ober a nevez he gonfesion hag ar re en defe great da c'houde.

G. *Ann nep en deuz klasket mad he bec'hejou, hag en deuz goulskoude ankounac'heat eur pec'hed marvel bennag enn he gonfesion, petra dle-hen da ober ?*

R. Diskleria a dle ar pec'hed-se, kenta tro ma'z ai da govez goudeze.

G. *Penaoz e ranker kovez ar pec'hejou ?*

R. Pa vezer eharz treid ar c'honfesour, e ranker ober sin ar groaz, ha lavaret d'ar belek : *Ho pennoz d'inn, va zad, abalamour ma'm euz pec'het. Goudeze e tleer lavaret : Me govez ouz Doue holl c'halloudek, betek ar c'homzou-ma : dre ma faot.*

G. *Ha neuze petra zo da ober ?*

R. Neuze e ranker lavaret pegeit zo abaoe n'oar ket bet o kovez ; rei da anaout ha resevet oa

bet ann absolvenn ha great ar binijenn, ha goudeze diskleria ar pec'hejou gant humilite ha lealded.

G. *Petra ranker da ober goude beza diskleriet ar pec'hejou ?*

R. Red eo achui ar bedenn : *Me govez ouz Doue*, selaou gant respet aliou mad ar c'honfesour, ha reseo ar binijenn a ro d'eomp.

G. *Petra dleer da ober pa resever ann absolvenn ?*

R. Red eo ober eunn akt a gontrision a greiz kaloun.

G. *Ha goude beza resevet ann absolvenn, petra ranker da ober ?*

R. Red eo trugarekaat Doue evit ar c'hras-se, hag ober kenta ma c'heller ar binijenn en deuz roet ar c'honfesour.

DAOU-UGENTVED KENTEL

AR ZATISFAKSION HAG ANN INDULJANSOU

G. *Petra eo ar zatisfaksion ?*

R. Ar zatisfaksion eo ar beamant euz ar boan a zo c'hoaz dleet d'ar pec'hed goude m'on euz bet ann absolvenn.

G. *Ha red eo d'eomp c'hoaz paea eur boan bennag da justis Doue evit ar pec'hejou m'on euz bet ann absolvenn anezho ?*

R. Ia, petra bennag m'eo bet pardounet d'eomp hor pec'hejou dre ann absolvenn, e rankomp c'hoaz, peurvuia, paea eur boan bennag da justis Doue evit ar pec'hejou-ze, er bed-ma pe er bed all e tan ar purkator.

G. *Penaoz e c'hellomp-ni paea da justis Doue er bed-ma ar boan a zo c'hoaz dleet d'hor pec'hejou goude ann absolvenn ?*

R. Ar boan-ze a c'hellomp da baea da justis Doue dre ar bedenn, ar iun, ann aluzen, ar basianted e kreiz labouriou ha trubuilhou ar vuez-ma, ha dreist peb tra dre ar binijenn a ro d'eomp hor c'honfesour.

G. *Pec'hed eo mankout da ober ar binijenn a ro d'eomp hor c'honfesour ?*

R. Ia, m'ar mankomp dre hor faot.

G. *Ouspenn ar boan a rankomp da baea da justis Doue, ha red eo d'eomp ive rapari ann offans on euz great d'ann nesa ?*

R. Ia, red eo d'eomp ive rapari, hervez nor galloud, ann offans on euz great d'ann nesa enn he gorf pe enn he ene, enn he vadou pe enn he henor.

G. *Petra eo ann induljansou ?*

R. Ann induljansou a zo eunn diskarg a ro ann Iliz euz ar boan on euz c'hoaz da baea da justis Doue evit ar pec'hejou a zo bet pardounet d'eomp dre ann absolvenn.

G. *Penaoz a ro ann Iliz ann diskarg-se ?*

R. Ann Iliz a ro ann diskarg-se oc'h ober d'eomp kaout perz e meritou Jezuz-Krist, e re ar Verc'hez ha re ar Zent.

G. *Pa ro ann Iliz induljansou, hag hon dispans a ra-hi da ober pinijenn ?*

R. Nann, ann Iliz ne fell ket d'ezhi hon dispans da ober pinijenn ; c'hoant e deuz hebken d'hor zikour er pezh ne c'hellomp ket da ober hon unan.

G. Ped seurt induljansou a zo?

R. Daou seurt induljansou a zo : lod a zo *plenier*, ha lod all n'int ket. Ann induljansou *plenier* a ro ann diskarg euz ann holl boan a zo c'hoaz dleet d'ar pec'hed goude ann absolvenn, hag ar re all ne roont ann diskarg nemed euz a eul lodenn hebken euz ar boan-ze.

G. Pehini eo ar gaera euz ann induljansou?

R. Ar gaera euz ann induljansou eo ar Jubile, a ro ar Pab da c'hounit avechou d'ann holl dud fidel euz ar bed.

G. Petra ranker da ober evit gounit ann induljansou?

R. Red eo beza e stad a c'hras, hag ober a boent da boent ar pezh zo merket gant ann Iliz.

KENTA KENTEL HA DAOU-UGENT

SAKRAMANT ANN NOUENN

G. Petra eo ann Nouenn?

R. Ann Nouenn a zo eur zakramant instituet evit ober vad da ene ha da gorf ar re a zo goall glanv.

G. Pe seurt vad a ra ann Nouenn da ene ann dud klanv?

R. Ann Nouenn a neta ene ann dud klanv dioc'h ar pezh a jom varlec'h ar pec'hed ha dioc'h ar pec'hed zoken, mar d-euz c'hoaz unan bennag var ar goustians. Rei a ra nerz d'ezho a enep ann tentasionou, hag ho sikour a ra da vervel santelamant.

G. Pe seurt vad a ra ann Nouenn da gorf ann dud klanv?

R. Ann Nouenn a zousa poaniou ar re glanv, hag a ro d'ezho zoken ar iec'hed, ma kav da Zoue e ve mad ann dra-ze evit silvidigez ho ene.

G. Petra ra ar belek pa ro ann Nouenn?

R. Ar belek a ra sin ar groaz gant ann oleo sakr var skianchou ann den klanv, enn eur bedi Doue da bardouni d'ezhan ar pec'hejou en deuz great dre ar skianchou-ze.

G. Petra dle ann den klanv da ober pa reseo ann Nouenn?

R. Ann den klanv a dle goulenn pardoun digant Doue ouz ar pec'hejou en deuz great dre ann izili euz he gorf ma toucher outho ann oleo sakr, ha kinnig he boan d'ezhan, a-unan gant poaniou Jezuz-Krist.

G. Ann dud fidel a zo var al leac'h pa vez nouet unan bennag, petra dleont-hi da ober?

R. Pedi a dleont evit ann den klanv, hag ob r ho zonj da veva evel guir gristenien, evit kaout ho unan eur maro mad ha santel.

G. Ha red eo gortoz ann amzer ziveza evit beza nouet?

R. Nann, aoualc'h eo e vet goall glanv, hag ar re a reseo ar zakramant-ze pa vez ho anaoudegez gantho a reseo muioc'h a c'hrasou.

G. Ar re a zo var ho zremenwan, hag hi a c'hell c'hoaz reseo eur c'hras all?

R. Ia, reseo a c'hellont ann induljans *plenier*, a hanver induljans ar maro mad.

G. Petra dle ann den klanv da ober evit gounit ann induljans-se?

R. Goulenn a dle sikour digant Jezuz enn eur c'helver anezhan dre he hano santel, hag ober da Zoue, gant eur spered a binijenn, ar sakrifis euz he vuez.

EIL GENTEL HA DAOU-UGENT

SAKRAMANT ANN URS

G. *Petra eo ann Urs?*

R. Ann Urs a zo eur zakramant hag a ro ar c'halloud da ober ar pezh a zo e karg ann dud a Iliz, hag ar c'hras d'en ober santelamant.

G. *Piou a c'hell rei sakramant ann Urs?*

R. N'euz nemed ar Pab hag ann Eskibien hag a c'helfe rei sakramant ann Urs.

G. *Hagaoualc'h eod'ann Eskibien had'ar Veleien beza resevet sakramant ann Urs evit gellout ober kement tra a zo enn ho c'harg?*

R. Nann, traou a zo ha ne c'hellont ket ober, anez beza bet, digant ar Pab pe digant ann Aotrou'n Eskop, eur c'halloud all ouspenn ann hini a zo stag ouz sakramant ann Urs.

G. *Diskouezit ann dra-ze enn eur feson sklearoc'h?*

R. Evelse, eunn Eskop ne c'hell ket gouarn eunn eskopti nemed lakeat e ve bet e penn ann eskopti-ze gant ar Pab; eur belek ne c'hell ket kovez nemed galloud en defe bet evit kement-se digant ann Aotrou'n Eskop.

G. *Pere eo deveriou ann dud fidel e kenver ann Aotrou'n Eskop hag ar Veleien?*

R. Ann dud fidel a dle da genta, respeti ann Aotrou'n Eskop hag ar Veleien, abalamour ma'z int ministred Jezuz-Krist; d'ann eil, senti outho, abalamour ma komzont enn hano Jezuz-Krist, ha d'ann trede, kaout anaoudegez vad evitho, abalamour ma labouront evit silvidigez ho eneo, ha ma c'h henchont anezho da vont d'ar baradoz.

TREDE KENTEL HA DAOU-UGENT

SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

G. *Petra eo ar Briedelez?*

R. Ar Briedelez a zo eur zakramant hag a ro d'ar re a zimez ar c'hras da veva evel guir gristenien asambles, ha da zevel ho bugale e doujans Doue.

G. *E pe stad e ranker beza evit reseo ervad sakramant ar Briedelez?*

R. Arabad eo e ve netra etre ar re a zimez hag a virfe outho d'en em gemeret ann eil egile da bried, ha red eo ouspenn beza e stad a c'hras.

G. *Hag eur pec'hed braz eo dimezi pa vez etre ar re a zimez eunn dra bennag hag a vir outho d'en em gemeret ann eil egile da bried?*

R. Ia, ann dra-ze a zo eur pec'hed braz, ha dioc'h ar pezh a ve, eunn dimezi great evelse heb dispans, a ve nul hag heb talvoudegez ebed.

G. *Ar gristenien ne d-eont nemed d'ann ti-kear evit beza eureujet, hag hi a zo dimezet dirag Doue?*

R. Nann, n'euz guir eured ebed nemed ann hini a zo great hervez lezennou ann Iliz.

G. *Pere eo deveriou ar priejou ann eil e kenver egile?*

R. Ar priejou a dle en em garet hervez Doue, en em zikour enn ho ezommou, gouzanv gant pasianted ann eil defaoutou egile, ha rei d'ho bugale eur gelennadurez kristen.

G. *Petra zo kaoz ma'z euz kalz a zimiziu maleuruz?*

R. Ar pezh zo kaoz eo abalamour m'oar bet dimezet e stad a bec'hed marvel, pe abalamour ne vever ket hervez Doue er stad a briedelezh.

G. *Ha n'euz ket eur stad all parfetoc'h eged ar Briedelezh?*

R. Eo, bez 'ez euz eur stad all parfetoc'h eged ar Briedelezh, hini ar guerc'hded kristen.

PEDERVED KENTEL HA DAOU-UGENT

DIVARBENN SANTIFIA AR PEZ A VEZ DA OBER BEMDEZ

G. *Penaoz e c'heller santifia ar pezh a vez da ober bemdez?*

R. Oc'h ober peb tra evit plijout da Zoue.

G. *Petra dle eur c'hristen mad da ober pa zihur dioc'h ar mintin?*

R. Ober a dle sin ar groaz, ha lavaret da Zoue: Va Doue, me hoc'h ador hag ho kar a greiz va c'haloun. Me ginnig d'ehoc'h va qberiou ha va foaniou gant ar c'hoant am euz da heul e peb tra ho polontez santel.

G. *Petra dle da ober goude m'eo savet?*

R. Mont a dle d'ann daoulin da lavaret he bedennou dioc'h ar mintin.

G. *Petra dle da ober evit santifia he labour?*

R. Kinnig a dle al labour-ze da Zoue, ha gouzanv heb en em glemm ar boan en deuz ganthan.

G. *Petra dle da ober evit santifia he brejou?*

R. Ober a dle eur bedennik araok ha goude peb pred.

G. *Petra dle da ober evit santifia he gomzou?*

R. Var evez e tle beza ato gant aoun ne lavarfe netra hag a ve kountrol d'ar relijion, d'ar virionez, d'ar garantez ha d'ar vodedi.

G. *Petra dle da ober evit santifia fin he zevez?*

R. Evit santifia fin he zevez, e tle lavaret he bedennou dioc'h ann noz, teuler eur zell var he goustians, ha kinnig he gousk da Zoue enn eur ober sin ar groaz



PEDENNOU

Dioc'h ar mintin ha dioc'h ann noz,

E KERNE, E LEON HAG E TREGER

E KERNE

PEDENNOU DIOUZ AR MINTIN

Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret.

Evit adori Doue.

M'hoc'h ador, ma Doue, ma C'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, ma Zalver,
Hirio ha keit ha ma vevinn
Ho servicha humbl a fell d'inn.

Evit trugarekaat Doue.

M'ho trugareka, ma Aotrou,
Evit hoc'h oll madelezou :
D'am beza krouet, konservet,
Prenet, enn Iliz resevet.

Evit en em rei da Zoue.

Kement a rinn, a livirinn,
A zonzinn hag a andurinn,
A offran holl da c'hloar Doue
Dreizhoc'h, Mari, mamm a drue.

Evit prometi beza fidel da Zoue.

Me a bromet en em viret,
Gant gras Doue, diouz peb pec'hed,

— 77 —

Hag observi lezenn Doue,
Evit plijout d'he vajeste.

Evit goulenn gras Doue.

O ma Jezuz, sellet ouzinn
Ha roit d'inn ar pezh a fell d'inn;
Roit d'inn ar c'hras d'ho karet bepred
Hag ar c'hras n'hoc'h offansinn ket.

Evit pedi ar Verc'hez.

Guerc'hez Vari, mamm benniget,
Var ma maro ma zikouret.
Guerc'hez Vari, mamm da Zoue,
O pet truez ouz ma ene.

Evit pedi ann El-Mad.

Ha choui, ma El-Mad, kannad Doue,
Miret ma c'horfi ha ma ene;
Ma miret ouz ann drouk-spered
Ha dreist peb tra diouz peb pec'hed.

Enn henor d'hor Patron pe d'hor Patronez.

Ma faeron, ne veritan ket
Dougen ann hano a zouget;
Goulskoude, pa'm euz ann henor,
O pet truez ouz ho fillor.

Ar merc'hed a lavaro :

Ma maeronez, ne veritan ket
Dougen ann hano a zouget;
Mes me ho ped, ma maeronez,
O pet sonj euz ho fillorez.

Evit pedi Jezuz-Krist hag ar Zent.

Jezuz, Mari ha Joseph, Anna ha Joachim,
Sant Mikael, ma El-Mad, sant Per, sellet ouzinn :

Ma faeron, santez Barba, glorius sant Korantin,
Brema ha var ma maro o pet truez ouzinn.

Evit esperout e Doue ha goulenn hon ezommou.

Pater noster... (pajenn 50).

pe : Hon Tad, pehini zo enn env... (pajenn 50).

Evit pedi hag henori ar Verc'hez.

Ave Maria... (pajenn 52).

pe : Me ho salud, Mari... (pajenn 53).

Evit kredi a galoun ann holl artiklou euz ar Feiz.

Credo in Deum... (pajenn 6).

pe : Me a gred e Doue... (pajenn 5).

Evit goulenn pardoun euz hor pec'hejou.

Confiteor Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper Virgini, beato Michaeli archangelo, beato Joanni Baptistæ, sanctis apostolis Petro et Paulo et omnibus Sanctis, quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere, meâ culpâ, meâ culpâ, meâ maximâ culpâ. Ideo precor beatam Mariam semper Virginem, beatum Michaellem archangelum, beatum Joannem Baptistam, sanctos apostolos Petrum et Paulum, et omnes Sanctos orare pro me ad Dominum Deum nostrum.

Megovez ouz Doue holl-c'halloudek, ouz ar Verc'hez gloriuz Vari, ouz ann Aotrou sant Mikael arc'hel, ouz ann Aotrou sant Iann-Vadezour, ouz ann ebestel sant Per ha sant Paol, hag ouz ann holl Zent, abalamour ma'm euz pec'het braz dre zonz, dre gomz, dre ober, dre ma faot, dre ma faot, dre ma brasa faot. Rak-se e pedann ar Verc'hez gloriuz Vari, ann Aotrou sant Mikael arc'hel, ann Aotrou sant Iann-Vadezour, ann ebestel sant Per ha sant Paol, hag ann holl Zent da bedi Doue evidon.

Evit karet Doue hag hon nesa.

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eunn Doue hebken a adori,
Ha dreist peb tra holl a gari.
2. Heb kaoz he hano na doui ket.
Nag ive netra all ebed.
3. Miret a ri ann oll zuliou,
Gant euvrou mad ha pedennou.
4. Da dad, da vamm a henori,
Ha da vuez a astenni.
5. Ha mir na lazi den ebed,
Nag a galon, nag a effed.
6. Lubrik mir na vezi bepred,
Dindan boan da veza daonet.
7. En em ziuall diouz laeronsi,
Na dommach da hentez na ri.
8. Na gevier na fals testeni
Mir birviken na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag e sonch vil n'en em bliji.
10. Madou re all ne zezir ket
Evit ho c'haout heb guir ebed.

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ

1. Kleo devot a benn-da-benn,
Bep sul, bep gouel, ann offerenn.
2. Neuze peb labour a lezi
Evit da Zalver henori.
3. Kovez a ri, da vihana,
Eur vech er bloaz heb nac'h netra.
4. Ha da Bask e sakramanti,
Rak-se e stad vad e vevi.
5. Iun a ri ann daouzek deiziou,
Ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Na da zadorn, na da vener,
Na zebri kig e neb amzer.

LITANIU JEZUZ

Kyrie, eleison. — Christe, eleison. — Kyrie, eleison. —
Jesu, audi nos. — Jesu, exaudi nos.

Pater de cœlis, Deus, miserere nobis.	Jesu sapientia æterna, miserere nobis.
Fili redemptor mundi Deus.	Jesu bonitas infinita.
Spiritus Sancte Deus.	Jesu via et vita nostra.
Sancta Trinitas unus Deus.	Jesu gaudium Angelorum.
Jesu Fili Dei vivi.	Jesu rex Patriarcharum.
Jesu splendor Patris.	Jesu magister Apostolorum.
Jesu candor lucis æternæ.	Jesu doctor Evangelistarum.
Jesu rex gloriæ.	Jesu fortitudo Martyrum.
Jesu sol justitiæ.	Jesu lumen Confessorum.
Jesu fili Mariæ virginis.	Jesu puritas Virginum.
Jesu amabilis.	Jesu corona Sanctorum omnium.
Jesu admirabilis.	Propitius esto, parce nobis, Jesu.
Jesu Deus fortis.	Propitius esto, exaudi nos, Jesu.
Jesu pater futuri sæculi.	Ab omni malo, libera nos, Jesu.
Jesu magni consilii ango.	Ab omni peccato.
Jesu potentissime.	Ab ira tuâ.
Jesu patientissime.	Ab insidiis Diaboli.
Jesu obedientissime.	A spiritu fornicationis.
Jesu mitis et humilis corde.	A morte perpetuâ.
Jesu amator castitatis.	A neglectu inspirationum tuarum.
Jesu amator noster.	Per mysterium sanctæ incarnationis tuæ.
Jesu Deus pacis.	Per nativitatem tuam.
Jesu auctor vitæ.	Per infantiam tuam.
Jesu exemplar virtutum.	Per divinissimam vitam tuam, libera nos, Jesu.
Jesu zelator animarum.	
Jesu Deus noster.	
Jesu refugium nostrum.	
Jesu pater pauperum.	
Jesu thesaurus fidelium.	
Jesu bone pastor.	
Jesu lux vera, miserere nobis.	

Per labores tuos, libera nos, Jesu.	Per mortem et sepulturam tuam, libera nos, Jesu.
Per dolores tuos.	Per resurrectionem tuam.
Per agoniam et passionem tuam.	Per ascensionem tuam.
Per crucem et derelictionem tuam.	Per sanctissimæ Eucharistiæ institutionem tuam.
Per languores tuos, libera nos, Jesu.	Per gaudia tua.
	Per gloriam tuam, libera nos, Jesu.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis, Jesu.
Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Jesu.
Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis, Jesu.

Jesu, audi nos. — Jesu, exaudi nos.

Sit nomen Domini benedictum. — Ex hoc nunc et usque in sæculum.

OREMUS

Domine Jesu Christe, qui dixisti : petite et accipietis, quærite et invenietis ; pulsate et aperietur vobis, quæsumus, da nobis petentibus divinissimi tui amoris affectum, ut te toto corde, ore et opere diligamus, et a tuâ nunquam laude cessemus. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

Angelus Domini nuntiavit Mariæ, et concepit de Spiritu Sancto. — Ave, Maria, etc.

Ecce ancilla Domini, fiat mihi secundum verbum tuum. — Ave, Maria, etc.

Et Verbum caro factum est, et habitavit in nobis. — Ave, Maria, etc.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix.

— Ut digni efficiamur, promissionibus Christi.

OREMUS

Gratiam tuam, quæsumus, Domine, mentibus nostris infunde, ut qui, angelo nuntiante, Christi Filii tui incarnationem cognovimus, per passionem ejus et crucem ad resurrectionis gloriam perducamur. Per eundem Christum Dominum nostrum. — Amen.

PEDENNOU DIOC'H ANN NOZ

Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret.

Evit trugarekaat Doue.

M'ho trugareka, ma Aotrou,
Evit hoc'h holl madelezou,
D'am beza krouet, konservet
Ha diouz peb pirill diouallet

Evit goulenn sklerijenn da anaout hor pec'hejou.

Roit d'inn, ma Jezuz, guir c'houlou
Evit anaout ma fec'hejou.
Sonjit, ma ene, em offansou,
Euvrou, komzou, sonjezonou.

Evit goulenn pardoun euz hor pec'hejou.

Keuz am euz d'ho peza offanset,
Ma Doue, din da veza karet.
Me a bromet d'en em viret,
Gant gras Doue, diouz peb pec'hed.
Guerc'hez Vari, etc. (*pajenn 77, betek Litanieu Jezuz.*)

LITANIOU AR VERC'HEZ

Kyrie, eleison. — Christe, eleison. — Kyrie, eleison. —
Christe, audi nos. — Christe, exaudi nos.

Pater de coelis Deus, mise-	Sancta Maria, ora pro no-
rere nobis.	bis.
Fili redemptor mundi Deus,	Sancta Dei Genitrix.
miserere nobis.	Sancta Virgo virginum.
Spiritus Sancte Deus, mi-	Mater Christi.
serere nobis.	Mater divinæ gratiæ.
Sancta Trinitas unus Deus,	Mater purissima, ora pro
miserere nobis.	nobis

Mater castissima, ora pro nobis.	Turris Davidica, ora pro n.
Mater inviolata.	Turris eburnea.
Mater intemerata.	Domus aurea.
Mater amabilis.	Fœderis arca.
Mater admirabilis.	Janua cœli.
Mater boni consilii.	Stella matutina.
Mater Creatoris.	Salus infirmorum.
Mater Salvatoris.	Refugium peccatorum.
Virgo prudentissima.	Consolatrix afflictorum.
Virgo veneranda.	Auxilium Christianorum.
Virgo prædicanda.	Regina Angelorum.
Virgo potens.	Regina Patriarcharum.
Virgo clemens.	Regina Prophetarum.
Virgo fidelis.	Regina Apostolorum.
Speculum justitiæ.	Regina Martyrum.
Sedes sapientiæ.	Regina Confessorum.
Causa nostræ lætitiæ.	Regina Virginum.
Vas spirituale.	Regina Sanctorum omnium.
Vas honorabile.	Regina sine labe originali concepta.
Vas insigne devotionis.	Regina sacratissimi Rosarii,
Rosa mystica.	ora pro nobis.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis, Domine.
Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Domine.
Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis.

Ant. — Sub tuum præsidium confugimus sancta Dei Genitrix; nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus, sed a periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et benedicta.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix,
— Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS. Defende quæsumus, Domine, beata Mariâ semper Virgine intercedente, istam ab omni adver-

sitate familiam, et toto corde tibi prostratam, ab hostium propitius tuere clementer insidiis. Per Christum Dominum nostrum. Amen.

Evit ann Anaoun.

De profundis clamavi ad te, Domine; Domine, exaudi vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes, in vocem deprecationis meæ.

Si iniquitates observaveris, Domine; Domine, quis sustinebit?

Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.

Sustinuit anima mea in verbo ejus; speravit anima mea in Domino.

A custodia matutina usque ad noctem, speret Israel in Domino.

Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum redemptio.

Et ipse redimet Israel ex omnibus iniquitatibus ejus.

Requiem æternam dona eis, Domine.

— Et lux perpetua luceat eis.

Requiescant in pace. — Amen.

OREMUS

Fidelium, Deus, omnium conditor et redemptor, animabus famulorum famularumque tuarum remissionem cunctorum tribue peccatorum, ut indulgentiam, quam semper optaverunt, piis supplicationibus consequantur. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

Requiem æternam dona eis, Domine.

— Et lux perpetua luceat eis.

Requiescant in pace. — Amen.

Ann Angelus e brezounek.

Eunn Arc'hel, a berz ann Aotrou,
A ziskennaz euz ann envou; (*bis*)
D'annons da Vari oa choazet
Evit mamm da Zalver ar bed. (*bis*)

Ave, Maria...

Mari a respountaz neuze :
Servicherez ounn da Zoue,
Bezef gret eta em andret
Hervez m'oc'h euz d'inn annonsset.

Ave, Maria...

Neuz' e konsevez eur bugel
Dre vertuz ar Spered-Santel,
Hag ar Verb, en em inkarnet,
Etouez ann dud en deuz bevet.

Ave, Maria...

Pedit, Mamm Zantel da Zoue,
Evidomp holl he vajeze,
Ma vezimp din euz ar grasou
A bromet Jezuz, hon Aotrou.

Gloria Patri, etc.

Enn amzer zantel a Bask.

En em gonzolit evit mad,
Rouanez euz ann envou;
Sec'hit pelloc'h ho taoulagad
Hag arretit ho taelou :
Resusitet ez eo ho Mab
Leun a c'hloar, a driomphou.
— Alleluia! pebez joa
D'ehoc'h-hu, Mamm a garantez!
D'eomp-ni ivez, Alleluia!
Pebez laouennedigez
He velet, goude hor prena,
Adarre leun a vuez!

ia, Guerc'hez, bezit joaiuz,
O pet konsolation,
Resusitet ez eo Jezuz,
Hervez he brediksion.
Dirazhan, Mamm drugarezuz,
Roit d'eomp ho proteksion.
— Alleluia, etc.

Va Doue, o resusita
Ho Mab Jezuz, hon Aotrou
E karghoc'h ar bed a joa.
Grit d'eomp dre he veritou
Ha re ann Itroun Varia
Mont holl da c'hloar ann envou.
— Alleluia, etc.

Ann Angelus e c'hiz all.

Ni ho salud gant karantez,
Rouanez ar Zent hag ann Elez ;
C'houi a zo benniget,

O pia,
Hag a c'hrasou karget,
Ave, Maria !

Ra vezo benniget Jezuz
Ar frouez euz ho korf evuruz,
Kanomp gant ann Elez

O pia,
He veuleudi bemdez,
Ave, Maria !

Ni ho ped, Mari, guerc'hez c'hlan,
Pa vezimp var hon tremenvan,
Da c'houlenn ouz Jezuz

O pia,
D'eomp eur maro euruz,
Ave Maria !

E LEON

PEDENNOU DIOC'H AR MINTIN

O Tad, Mab ha Spered-Santel,
Me gred oc'h eunn Doue eternal,
Krouer ann holl, partout prezant,
Me hoc'h ador devotamant.

Me gred oc'h tri ferson divin,
Ho zri ker braz, ker fur, ken din,
Distink ann eil diouz egile,
Eunn Doue ho zri, non pas tri Doue.

Me gred oc'h just ha gallouduz
Da rei d'ar vis ha d'ar vertuz,
Dioc'h ar mirit ar rekoumpans,
Punision diouz ann offans.

Me gred ann inkarnasion
Ha mister hon redempcion :
C'houi, Mab Doue, en em c'hreat den
Evit prena 'nn natur huñnen.

M'hoc'h ador, Jezuz, va Zalver,
Er zakramant euz ann aoter ;
Me gred emaoe'h enñhan prezant,
Gwir den, guir Doue realamant.

Konsakri a rann va dervez
D'ho kloar ha d'am zilvidigez,
Hag ec'h offrann va holl boaniou
E pinijenn d'am fec'hejou.

Pater, Ave, Credo, Confiteor, Litanion Jezuz.

PEDENNOU DIOC'H ANN NOZ

Konsakri a rann va nozvez
D'ho kloar ha d'am zilvidigez,
Hag ec'h offrann va holl boaniou
E pinijenn d'am fec'hejou.

Eksaminomp hor c'houstians.

Pardoun, va Doue trugarezuz,
Pardoun, enn hano va Jezuz !
Keuz am euz abalamour d'ehoc'h;
Gant ho kras me jecho pelloc'h.

Guerc'hez Vari, guir vamm Doue,
C'houi zo va fizians 'nn he c'houde;
Ha c'houi, sant Joseph, he fried,
Ouzhoc'h ho taou m'en em erbed.

O Kaloun sakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbed karantezuz,
Ra viot da viken karet
Ha da virviken adoret.

*Pater, Ave, Crêdo, Confiteor, Litaniou ar Verc'hez,
etc.*

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eunn Doue... (*pajenn 26*).

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ

1. Ar goueliou berz... (*pajenn 42*).

E TREGER

PEDENNOU DIOC'H AR MINTIN HA DIOC'H ANN NOZ

Akt a fe var brezans Doue.

Va Doue, me gred fermamant
Penaos ez oc'h aman prezant,
Kak-se, gant guir humilite,
Me rent hommach d'ho majeste

Akt a adoration.

M'hoc'h ador, Doue, va C'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va Zalver,
C'houi eo va mestr ha va Roue,
Ha d'ehoc'h ounn tout korf hag ene.

Akt a drugare.

M'ho trugareka, va Aotrou,
Demeuz hoc'h holl madelezou :
D'am bea krouet ha prenet,
Hag enn hoc'h Iliz resevet.

Akt a offrans.

Kement a rinn, a livirinn,
A zonzinn pe a andurinn,
A offrann holl da c'hloar Doue
Dreizhoc'h, Mari, mamm a drue.

Ekzamin a goustians.

Va Jezuz, roit d'inn sklerijenn
Evit ober va eksamen,
Hag eur gontrision barfet
A gement pec'hed am euz gret.

Akt a gontrision.

Va Doue, me zo glac'haret
D'ho pea kement offanset,
Abalamour d'ho madelez,
D'ho majeste, d'ho zantelez.

Resolution.

Me a bromet d'en em viret
Gant gras Doue ouz peb pec'hed,
Specialamant ouz ar re
Ma ounn muia kustum d'ezhe.

Akt a c'houlenn.

Sellit ouzinn, o va Jezuz !
Roit d'inn eur c'hras presiuz,
Ar c'hras d'ho servicha fidel
Ha d'ho karet betek mervel.

Pedenn d'ar Verc'hez.

Guerc'hez, va mamm garantezuz,
Va rekommandit da Jezuz.
Guerc'hez, va mamm ha va itron,
Me rekommand d'eoc'h va c'halon.

Pedenn d'ann El-Mad.

Va El-Mad, mesajer Doue,
Miret va c'horf ha va ene,
Va miret ouz ann drouk-spered
Ha dreist peb tra ouz ar pec'hed.

Pedenn d'ann oll Zent.

Me ho ped, Sent ha Sentezed,
Da vea va alvokaded,
Obtenit d'inn digant Jezuz
Eur maro mad hag evuruz.

Pater, Ave, Credo, Confiteor, etc., etc.

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eunn Doue hebken a adori
Ha dreist peb tra holl a giri.
2. Doue enn ven na doui ket,
Na netra all demeuz ar bed.
3. Ar zuliou zantel a viri
Evit Doue ma zervichi.
4. Da dad, da vamm a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Muntrer ne vi e nep feson,
Nag a effet, nag a galon.
6. Diouall ouz al lubrisite
Nag a gorf, nag a ene.
7. Dommach ebed da zen na ri,
Mar ac'h euz gret, hast rapari.
8. Gevier na nep fals testi
Mir birviken na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag enn sonj vil n'en em bliji.
10. Madou re all ne zezir ket
D'ho c'hemeret heb lealded.

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ

1. Kleo devotamant penn-da-benn,
Bep sul, bep goel, ann offerenn.
2. Santifia ri ar goeliou,
Var ho hed, evel ar zuliou.
3. Kovez da bec'hejou, heb mez,
Da vihana bep bla eur vech.
4. Korf da Zalver a resevi,
Enn amzer Bask heb differi.
5. Iun a ri ann daouzek deiou,
Ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Da voener kig na zebri ket,
Nag ivez d'ar zadorn nepred.

Litaniou Jezuz, pe Litaniou ar Verc'hez

EVIT GOUNIT ANN INDULJANSOU

Akt a fe.

Me a gred ferm, o va Doue,
Ann holl artiklou euz ar fe.
Rak c'houi en deuz ho revelet
Hag a zo guirion pa gomzet,
Hag ann liz a bropoz d'inn
Ann artiklou-ze da gredin.

Akt a esperans.

Va Doue, va holl esperans,
Ennhoc'h ema va holl fians,
Abalamour ma oc'h bepred
Fidel d'ho ker, mad em andret.

Akt a garante.

Doue leun a berfeksion,
Me ho kar a greiz va c'halon,
Abalamour ma veritet
Dreist peb tra holl bea karet;
Va nesa a garann ive
Abalamour d'ehoc'h, va Doue.

Angelus, De profundis, etc.

PEDENNIK ARAOK AR PRED

Benedicite. — Dominus. — Nos et ea quæ sumus
sumpturi benedicat dextera Christi. In nomine Pa-
tris, et Filii, et Spiritûs Sancti. Amen.

PEDENNIK GOUDE AR PRED

Agimus tibi gratias, omnipotens Deus, pro uni-
versis beneficiis tuis, qui vivis et regnas in sæcula
sæculorum. Amen.

Benedicamus Domino. — Deo gratias.

Fidelium animæ per misericordiam Dei requies-
cant in pace. Amen.

PEDENN D'ANN EAL-GARDIAN

Angele Dei, qui custos es mei, me tibi commissum
pietate supernâ hodiè illumina, custodi, rege et gu-
berna. Amen.

Eal Doue, pa'z oc'h d'inn gardian, karget gant Pro-
vidans Doue d'am c'has d'ann euruzded, sklerait va
spered, diouallit va c'halon, ha kendalc'hit bepred
da gaout soursi ac'hanon. Evelse bezet great.

ÉDITIONS SPECIALES

DE L'IMPRIMERIE DE L'ÉVÊCHÉ

18, rue des Boucheries, à QUIMPER.

<i>Catechisme du Diocèse de Quimper et de Léon</i>	f. 30
<i>Petit Catechisme du Diocèse de Quimper et de Léon</i>	» 10
<i>Katekiz Eskopti Kemper ha Léon</i>	» 30
<i>Katekiz bñhan Eskopti Kemper ha Léon</i>	» 10
<i>Cantique français du Diocèse</i>	» 50
<i>Kantikou brezounek ann Eskopti</i>	» 40
<i>Bref du Diocèse</i>	1 25
<i>Histor Zantel (illustrée)</i>	» 50

(Les prix indiqués sont ceux de la vente au détail.)

On trouve ces ouvrages, en gros et en détail,
aux mêmes conditions qu'à L'IMPRIMERIE DE
L'ÉVÊCHÉ, dans les dépôts établis :

- A Quimper, chez M. SALAUN, libraire ;
- A Brest, chez M. TOURMEN, libraire ;
- A Landerneau, chez M. DESMOULANS, libraire ;
- A Morlaix, chez M. ROGER, libraire ;
- A Quimperlé, chez M. CARRÉ, libraire.